

Breizh Nevez

Mevel ar Maner

troet diwar ar hembraeg

gand J. ABASQ

ENEZENN AR PEVAR HOULZ-AMZER

gand J.-C. MIOSSEC

Lavariou e yez Leon

Kanv war ar han-ha-diskan

Pladenn nevez A. Stivell

N° 72 - 1984

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

Niverenn 72

Miz c'hwevrer 1984.

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- broiou estrañjour: 100 lur.

Eur houmanant a dalv evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Ar chekenou-post a zo da veza lakaet war K.R.P. « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Disklêriet hervez al lezenn: kenta trimiziad 1984.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad euz Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

P.M. Mevel: Meurlarjez.....	3
D. Rhagfyr Jones: Mevel ar Maner, troet gand J. Abasq.....	5
J.C. Miossec: Enezenn ar pevar houlz-amzer.....	18
K. Riou: Salmou.....	27
Yves Miossec: O foeta bro e Breiz-Izel, XI.....	29
Louis Cong: Hekleo Traon-Bouzar, XVIII. Lavariou on tud-koz e yez Bro-Leon.....	32
Yves ar Bian: Ar goulennou e Leurgêr Trelaouenan e 1946.....	38
Abel Adost: Kañv war ar han-ha-diskan.....	42
J. Goyat: « Mojenn » gand Alan Stivell.....	43
Yves Miossec: Ar ger « karr-nij » krouet dirazon.....	45
Kemennou.....	50
Lizerou.....	54

Malarje Lannuon

Diskan

Kemerom plijadur, braz ha bihan,
Ha deom oll da zañsal, da ganañ,
Ma tregerno hekleo or mouez
En tu all da Vulian ha Rospez.
Lanuon vez birvikoh adarre
Pa zegouez goueliou braz Malarje.

On tadou-koz a Vro-Dreger
'Vid dizonjal o foaniou hag o mizer,
A ouie bevañ, ze zo sur,
Kemer a-wechou plijadur,
Sevel a rejont evel-se
Goueliou 'n enor da Valarje.

Pevar devez leun pe ouspenn
E c'hoarier an abadenn,
Adal ar zadorn d'ar merher
E vez dañset hag e youher
Meuleudiou d'e Vajeste,
Gloar d'an Aotrou lard Malarje.

E-barz eur vag pe 'n eur vagon
'Teu Malarje da Lanuon.
Neuze ar paour, ar reuzeudig
En em gav deuet pinvidig;
Ar re glañv ' zaill euz o gwele
A-drugarez da Valarje.

D'ar zul ' vez c'hoarz ha cholori
P'ema o tremen ar hirri,
Ar pennou leun a zonerezh,
Ar halonou a levez,
Ar re goz a ra gwad nevez
'N eur weled kirri Malarje.

Sellit ouz ar re dihizet,
Na pegen drol eh int gwisket!
Koñfetti 'nij a-zornadou
Tammou kig louz ha bouzellou,
Eur flistradennig goude-ze
Evid binnigañ Malarje.

D'al lun e weler o redeg
Ar strouill gand dillad truillenneg;
Buzulzo ha Zant Elived
Zo aze birvidig bepred,
Ha neuze « Viv' la liberté »
Pegwir ema gouel Malarje!

Ar meurz eo deiz ar vugale
Hag e savont euz o gwele
An debron e-barz o diouharr,
Prest da ziskenn da Gergomar
Evid kemer o lod ivez
Euz plijaduriou Malarje.

Re vuan e teu ar merher,
Devez trist maro ar merzer.
Neuze war bont Santez Anna
E-kreiz ar glahar ar vrasa
E c'hwezer tan war e horre,
War gorr ar paour-kêz Malarje.

Bremañ eo taolet 'barz ar stêr
Ha beuzet eo 'barz al Leger.
Erru eo siwaz an termen
D'an deveziou kaer ha laouen.
Kenavo dit ha trugarez,
Kenavo 'benn bloaz, Malarje.
Kenavo 'benn bloaz, Malarje.

P.M. Mevel

Y Lloft Fach

Y Lloft Fach a zo bet embannet e 1908. N'ouzon netra diwar-benn an aozer.

Diouz ma komprenan, Y Lloft Fach a oa eur seurt oaled leh m'en en vode tud ar gênadenn a-raog pe goude an ofisou er chapel. Al leor a lak an « oaled-ze » da gonta istor ar gênadenn da vare an Adginivelez („Revival“ e saozneg) d'an ampoent ma oe dibradet Bro-Zaoz a-bez ha Kembre muioh c'hoaz gand eur seurt korventenn a zevosion – war-dro ar bloaveziou 1850.

Eun dra all marteze a vefe ezomm da zisplega: e Bro-Zaoz dre vraz, hag e Kembre, edo kustum ar vourhizien da vond d'an iliz ofisiel (bet pelli stag ouz iliz Anglikan Bro-Zaoz, distaget e 1914), an dud vihannoh a 'z ee d'ar chapel. E leoniou zo, e weler an dud o tilezel ar chapel evid an iliz dre ma teuont da veza uhellou er gevredigez.

Ar pennad n'eo ket eur gontadenn, med eun istor wir, d'an nebeuta ar peb brasa anezl.

J.A.

Mevel ar Maner

Daou vloaz e oa bet Meredydd Pywel e servij ar Holonel Pari a-raog trei ouz ar relijion. E labour er maner a oa beza kocher dreist-oll, ha kas e vestr hag e vestrez e kêr pa veze ezomm. Den ne ouie Petra e-noa greet a-raog dezañ dond d'ar maner, ha den ne ouie muioh goude ma oa bet eno eur pennadig brao. Kement-se a lake anezañ war ar bazenn izella e istim tud ar vro, hag a vire outañ da ober darempred stard gand mevelien ar « Gell Arhant ». N'eus netra hag a zisplij kement d'an dud war ar mêt eged chom mud diwar-benn e vuhez. An dud war ar mêt n'o-deus istim ebed evid ar re a deu euz a leh all da veva en o zouez, nemed « diskarga a rafent o zahad » dioustu. Ar Holonel avad e-noa fiziañs vraz e Meredydd. Lakaad a reas anezañ da vestr war beb tra en diavêz d'an ti, ha pa gerzent dre an hent, ez edont heñvelloh ouz daou zen euz ar memez renk kentoh eged mestr ha mevel.

Gwall yen oa an traou avad etre ar mevel hag ar vestrez. Perag? se a zo diêz da lavared. Kredi a rafed he-doa homañ troet a-eneb dezañ azaleg an eil devez m'edo deuet di. Dirêzon-tre e seblante an dra-ze evid ar re e wele; med pa zoñjer e sao karantez ha kaz e kalon tud zo e nebeutoh a amzer eged daou zevez, n'eus ket da veza ken souezet-se. Hag an Itron Pari, war an tu-ze, a oa heñvel ouz eun ti-gwer, ken prim ha tra e tiwane ennañ an hadou. Marteze e teufed da houzoud ar perag diwezatoh, daoust ma vefe bet diêz da zen kavoud an digarez rik. Med eur wech digor ar gloued, ne oa netra da viroud ouz tra ebed da zond e-barz. Ar pezh a ree ar brasa diêz dezi e oa ma ne dostae jamez ar hoher ouz dor an Iliz anglikan. N'eo ket dre ma ree fae war draou ar relijion - d'or bodadegou-ni e teue beb sul da noz. Ha n'eo ket dre ma felle dezañ ober an disterra poan d'e vestr pe d'e vestrez. Med ne 'z ee wardro an Iliz anglikan na sul, na gouel, na

pemdezh. Hag an dra-ze a entane ragvarn e vestrez en e eneb. Evel ma ne vije ket bet tu da gaoud tamm relijion ebed en diavêz da Iliz ar Stad. Tud ar chapelioù ema krog ar memez tro-spered enno: setu m'eo diêz da hemañ pe enhont teuler ar mên kenta. Ar holonel a jome a-wechou souezet da zelled outi, pa glev e anezi oh izellaad Meredydd dirazañ; hag he doareou a veze remerket gand ar vevelien all, ha mitizien an ti. Ne oa den ebed, koulskoude, hag a ouie chom en e renk kenkouls ha Meredydd Pywel; hepred doujuz heb beza sklav, atao seven heb beza lubaner. Ken braz aotrou a oa anezañ en e vouez, e gaoz, e emzalh, hag ar holonel e-unan e peb mod; ha bez' e oa war e dro eun dra bennag a zave anezañ a-uz d'ar vevelien ha d'ar mitizien.

Med n'oa ket bet er Maner daou vloaz, setu ma tigouezas an darvoudou. Eet e oa ar Holonel d'an Iliz eun abardaez heb e wreg; ha ne oa den all ebed e-barz an ti nemed eur vatez, ha den er-mêt nemed Meredydd Pywel. An Itron Pari he-doa gloazet he zroad o tiskenn diwar gein he hazeg en derhent hag ez edo gourvezet war eur skaon-izel blod e-barz eur gambr en traoñ. Pa deuas Meredydd e-barz heb skei na goulenn aotre, ez eas ar vestrez war he hoazez, hag e sellas outañ gand eun dremm yenn-marbr. Bez' e oa eur vaouez koant-kenañ, ha meur a vloavez yaouankoh eged he gwaz. A-veh ma oa daou-ugent vloaz, tra ma oa ar Holonel ouspenn tri-ugent. N'e-noa ket Meredydd e-unan ouspenn daou-ugent.

Goude chom paret o zellou an eil war egile eur momed, e komzas an Itron Pari da genta:

- « C'hwi a gemer ar zal-mañ evid eur hraou-saout, va den? »
- « Ne ran ket avad; med e-toare e kemerit eur mignon evid eun enebour, » emezañ, heb sevel e vouez en doare ma ree-hi.
- « Kit er-mêt dre al leh m'oh deut, a-raog ma halvin Ruth da zigori an nor deoh! Biskoaz ken dicheg! » emezi, he mouez o sevel atao uhelloh.

Meredydd a reas eur paz pe zaou daveti. Hag e lavaras adarre war eun ton izel:

- « Ma n'ho-peus ket c'hoant e ouezfe toud an dud ar pezh am-eus da lavared deoh, selaouit ahanon sioul. N'ouzit ket piou 'm-eus gwelet e kêr? Jeff Harris! Ema o klask ahanoh, ha gouzoud a rit mad Petra a zimfi an dra-ze. Daoust hag e roit aotre din da jom

amañ beteg ma teuio ar Holonel endro? Pe gwelloc'h e vefe din mond dioustu da gerhad Jeff e-barz al « Leon Briz »?

M'en-defe skoet Meredydd Pywel war he fas gand e zorn serret, ne gav ket din he-defe e vestrez santet kement a boan ha pa roas dezi kelou diwar-benn Jeff Harris. He dremm a jeñchas liou, starda a reas he muzellou war he dent – selled a ree ouz Meredydd gand daoulagad dispourbellet eur follez. Neuze, e laoskas eun huanadenn bonner, hag e teuas enni he-unan, hag e tistroas eun tammig liou dezi. Bez' e klaskas goude-ze ober he fiah fier, med gwerzet e oa gand he dremm.

Ha setu amañ an afer penn-da-benn.

Ne oa ket kalz a vloaveziou abaoe ma oa deut an Itron Pari da veza herez war he madou, ha nebeutoc'h c'hoaz abaoe ma oa dimezet gand ar Holonel. Biken n'he-defe huñvreet he-defe bet kemend-all a jañs; rag bez' e oa etrezi hag an hentaj eun hanter zousenn heritourien all. He mamm a oa matez, heb tamm leve ebed dezi nemed he fas koant; hag o timezi ganti, ne gollas an tad netra, diwar ar rêzon sklêr n'e-noa netra da goll. Ne zaleas ket da vervel gand ar boeson, evel ma teree d'e hoant ha d'e renk. Petra ho-peus da hortoz digand eur seurt hanter aotrou ha ne anaveze nemed eur frazenn euz ar Skritur Zakr: « Palad ne hellan, ha mez am-eus da ober an dro* ». Goude ma oa interes, e tastumas ar vamm hag ar verh o oll vadou, hag ez ejont d'an Amerik, leh m'he-doa ar vamm kerent dezi. Me gav din e talhent eur seurt ti-loja eno beteg ma varvas ar vamm; hag e hounezent braoig o buhez.

Ne oa ket spiz ar pezh a gonte Meredydd diwar-benn al lodenn-mañ euz o istor, nag e pe vod e teuas-eñ da gaoud perz en afer. Kement ha ma hellan kompren, ha kement ha m'am-eus soñj, Meredydd a zalhe eur stal er memez kêr ganto, hag eh anaveze mad, diouz o gweled, an diou itron a zalhe an ti-loja en tu all d'ar ru. Med ne oa ket anavezet ganto. Hag ar sekret-mañ a ziskuillan izel-izel en ho tiskouarn: bez' e oa Meredydd klañv gand merh an ti all.** Gouzoud a ree mad n'e-noa chañs ebed da gaoud anezi, med kredi a ree-atao eneb an disfiziñs, hag e tigouezas dezañ beza paket genaoueg meur a dro dre e garantez evit.

8

Bez' e-noa eur hamalad e kêr, Jeff e ano, hag a oa eun ostiz pemdezieg euz an ti-loja. Mab e oa da unan euz marhadourien kêr, ha muioc'h arhant gantañ en e hodellou eged a skiant dindan e vleo evid deski dezañ penaoz forañ an arhant ar gwella. Setu penaoz e plijas d'ar vamm pa oa homañ beo, hag e reas d'ar verh dimezi gantañ a-raog m'he-doa bet amzer da ober tro he halon. Jeff a ziskouezas beza eun den didalvez a-walh, hag edo war var da gas an ti-loja d'an traoñ d'an daoulamm ruz. Ehanet oa bet an darempredou etrezañ ha Meredydd azaleg m'oant dimezet; med delher a ree atao eul lagad war an itron, gand aon na vefe greet droug dezi. Bez' e tennas anezi meur a dro diouz krabanou he gwaz, pa veze eur barrad mezventi warnañ; med hi ne ouie ket piou oa. Ha setu ar pezh a ra d'an istor beza ken souezuz.

Jeff a gustume a-wechou kemeret an oll arhant a oa en ti, evid mond da foeta hent e-pad eur miz a-raog dizrei d'ar gêr; ha pa zistroe, ne jome ket eur gweneg toull gantañ. Pa veze eet kuit, ne veze qwelet nag e kêr nag er hontre; ha den euz e gerent tosta ne ouie neuze pe beo pe varo e oa. Eur wech e oa tremenet pemzegtez abaoe ma oa eet da haloupad evel-se, pa zigouezas eun dra zouezuz-tre. War unan euz ar hazetennou a zeue beb sizun d'an ti-loja, e lenned istor eun den a oa bet lazec'h en em ganna en unan euz kêriou ar hontre. Den ne anaveze anezañ; med merkou a oa, evel lizerennou kenta e ano war e zillad dindan, a roe da gredi e oa Jeff an den-ze. Er memez kazetenn, hag er memez kolonenn e oa meneg euz merh unig Caleb Morgan, euz leh-mañ-leh, e Kembre, eet da Anaon; pedet e oa ar verh da zistrei d'ar vro goz, ha da skriva d'eun noter a oa roet e ano, hag e-noa traoù a-bouez da gemenn dezi.

Ha Jeff neuze? He bried a hortozas pemzegtez all evitañ da zistrei d'ar gêr, ma oa atao war douar ar re veo; med ne deuas na grik na grak digantañ. Neuze e lakeas gwerz war an ti-loja, hag e kavas eun den d'e brena. A-raog ma oa lakeet peb tra e-ratre, e oa tremenet eur bemzegtez all. Kelou ebed, avad, diwar-benn Jeff. Etreant he-doa kroget darempred gand an noter dre bellskrid ha dre lizer; ha goude beza habaskeet he houstiañs e-keñver he fried dianket, e kuitas ar vro. Nepell goude e touare e Kembre. Mond a reas war-eün da gaoud an noter, hag e oe kemennet dezi ez edo heritourez tosta da vadou ar familh. E gwirionez, evid beza resiz, hi a oa da veza perhenn dioustu. An heritourien all a oa marvet pep hini anezo, hag e oa deut da benn he gwir da herita.

9

Remerket ho-peus, me zo sur, n'am-eus ket lavaret he-doa klas- ket gouzoud petra oa digouezet gand he gwaz, goude lenn diwar e benn er gazetenn. M'am-befe lavaret an dra-ze, ne vefe ket bet ar wirionez ganen; n'ez eas ket zoken beteg ar gêr ma skrive ar gazetenn e oa bet lazet enni eun den hag a zeblante beza Jeff. N'ez eas ket di heh-unan, ha ne houennas digand den all ebed mond euz he ferz. Med, heb gouzoud dezi, Meredydd a oa eet – lennet e-noa an istor er gazetenn ivez –, hag e verzas ne oa ket Jeff an den-ze! Evel ma ne ouie ket penaoz he-doa kemeret ar wreg an traou, m'he-doa bet kelou zoken, ne grede ket e oa de- zañ da emelloud en afer. N'e-noa ket avad lennet istor an heritaj he-doa roet abeg dezi da vond da Gembre; ha m'en-defe lennet, klaoustre e vefe bet a-du gand mestrez an ti-loja. Evel-se, pa deuas da houzoud e-noa an ti cheñchet perhenn, e oa ar wreg eet kuit pell a oa; hag ar perhenn nevez ne ouie netra diwar-benn peleh e oa eet. Deuet e oa a-benn da guzad he roudou kenkoulz ha ma vefe bet o klask diankoud diouz krog al lezvam.

A-dra-zur ez edo an Itron Jeff onest a-walh evid kredi e oa maro he gwaz; med onestoh c'hoaz e vefe bet dezi rei da anaoud d'ar béd penaoz e oa he stad heh-unan. Dreist-oll pa deuas ar Holonel Pari da houenn diganti he dom hag he halon. Med chomet e oa dindan dalh he lorch a-wechall; ha pa deuas ar vez da heul war ar marhad, kenkoulz e vefe deoh gedal ar Menez Moel velen d'en em deuler er mor egeti da vond d'ar gador-govez. Diéz eo gouzoud perag eh asantas dimezi gand ar Holonel, daoust ma oa hemañ kalz kosoh egeti; mez setu, ken diéz all e oa gouzoud perag e ree tra pe dra. Bez' eh anavezad pevar den o-doa gou- lennet anezi, hag he-doa roet dezo ar zah, ha dalhet ar Holonel Pari. A-dra-zur evid ar Holonel ne oa den gweloh er béd eged an hini a deuas da veza e wreg; hag e kare anezi en e zoare dezañ; ne gav ket din avad e-noa tapet krog en he halon a- gevred gand he dom. E koulz an amzer e teuas da veza eun itron gintuz; hag evel 'm-eus lavaret, an dud wella a zave sonn o fenn diraz pa dremenet d'e-biou dezi war an hent.

Setu penaoz e oa stad an traou er maner pa deuas Meredydd da veza mevel braz gand ar Holonel. Gwall-zioul e chome Mere- dydd war an darn-mañ euz e istor ivez. Douetuz e-noa komprenet ez edo eet da Gembre ar vaouez a oa evitañ gwreg Jeff; deuet e oa da zoñjal e oa Jeff eun den hag a oa koulz e ankounac'haad, hag e oa gweloh dezañ lezel a-gostez ar pez ne zelle ket outañ, hag e oa deuet a-nebeudou d'henn ober, beteg an deiz m'e-noa

gwelet Jeff ez-veo. Ha gand an dra-mañ e oa trenket toud ar zou- benn. Dond a reas ar mab foran d'e gaoud en e stal, da glask kelou euz e wreg. Bloaveziou oa tremenet, komprenit, abaoe an dro ziweza m'e-noa dilezet anezi; hag edo homañ sur da veza dimezet d'ar Holonel Pari d'an ampoent. Ne lavaras ket Mere- dydd e oa-hi eet da Gembre, med Jeff a douas e felle dezañ adkavoud anezi ha goude ma vefe eet d'an ifern! Bez' e oa droch ha diskempenn en e gaoz, en e wisk, en e zoare beva. Pa hellas, e werzas Meredydd e stal, hag e teuas ivez da Gembre. Kredi a rafen e-noa lakeet en e huñvre e hellfe renta ar memez servij d'an Itron Jeff pa zigouezfe d'he gwaz tizoud anezi, evel m'e-noa greet en tu all d'ar mor. Hag evel ma tigouez an traou a-wechou, e kavas eur plas evel kocher gand ar Holonel Pari, d'e vrasa souez dezañ e-unan. Med brasoh c'hoaz e oe e zouez pa welas edo an Itron Pari ar vaouez a ree gwechall an Itron Jeff anezi.

Setu-me, goude ober tro bell, distro d'al leh ma oan kroget gantañ.

Ne blijas ket Meredydd eta d'an Itron Pari azaleg an devez ma 'z eas eno. M'ho-pefe goulennet ganti perag, ne gav ket din e vefe bet gouest da respont deoh. Ar holonel a gredas goulenn diganti eur wech, ha ne reas ket diou wech. Ouspenn al lorch a vehie anezi dre natur, e kleva eur seurt mouez kuz a-dreñv d'he empenn o lavared dezi e ouie an den-ze eun dra bennag diwar- benn he buhez a-wechall. E gwirionez, bez' e oa enni eun doare aon ha ne gave abeg ebed dezañ; hag eur seurt aon n'eo bet ja- mez na reiz nag eün. Kaoud a ree ez edo Meredydd oh atapia ar pez a ree; ha dond a ree dezi a-wechou ankounac'haad ez edo mevel d'ar Holonel, n'eo ket dezi. He lorch a bouzdas anezi da houenn digand ar Holonel kas anezañ kuit; ha n'eo ket dre ma oa gweloh gand Meredydd mond d'ar chapel kentoh eged d'an Iliz anglikan e oa gwelleet d'an traou. Heb mond pelloh, setu penaoz edo stad an traou.

Pa oa deuet enni heh-unan, e klaskas ober he flah fier, evel m'am-eus lavaret.

-« Piou eo Jeff?» emezi, sonn he fenn.

Netra nemed goulenn an dra-ze avad a ziskoueze da Veredydd ez edo bet trehet.

-« Ho pried euz an Amerik,» a respontas-eñ. « C'hwi 'gav deoh ez edo bet lazeta p'oh deut endro da Gembre - med n'oa ket. Ne lavaran ket n'ho-poa ket abeg a-walh da gredi an dra-ze - med lazeta ne oa ket. Ha n'eo ket maro, Itron Pari, n'eo ket! Beo eo hirio - emañ o chom er gêriadenn. Gwelet am-eus anezañ va-unan deh diweza, hag ez on sur em a o klask e wreg.»

O! nag a haloup a oa war hent braz he halon e-pad ar vunutenn-ze!

Ha ma teufe Jeff beteg enni?

Ha ma teufe ar Holonel da houzoud?

Daoust ha n'he-doa ket torret al lezenn, ha roet digarez d'he zeuler er prizon?

N'he-doa netra da ober nemed plega, ha plega d'an den he-doa bet kement a zroug outañ e-pad keid amzer.

Petra 'ta edo an den-ze o klask tizoud?

Pegement e oa e briz?

Ha posubl e vefe paea anezañ da jom peoh?

Sevel a reas he daoulagad etrezeg ennañ, ha ne welas en e re nemed truez ha doujañs.

-« Penaoz e ouzoh an traou-mañ toud?» emezi, re izel he mouez evid ma hellfe beza klevet gand eur skouarn bennag e toull an nor. E gwirionez, teuler evez a ree Meredydd ivez da gomz a vouez izel, ken na hellfe den kompren an istor, nemed eur ger amañ hag a-hont.

Ha setu ar mevel o konta an istor d'e vestrez, euz ar penn kenta beteg ar penn diweza, heb kuzad netra euz e zantimañchou e-unan; hag hi o selaou, hag o selaou, hag o selaou.

P'e-noa echu, setu an Itron Pari o sevel diwar ar skaon, hag oh astenn he dom da Veredydd.

-« Pardonit din,» emezi dre heriou trubuillet - evid beza bet

greet ken divalo deoh abaoe m'oh deut d'ar « Gell Arhant ».

Gand kement a nerz hag a wrez e stardas Meredydd he dom ma savas fiziañs ha galloud en he halon war an taol.

-« Me eo ar peher,» emezañ, « ha me eo am-eus ezomm beza pardonet. Amañ hepken em a va digarez: ho prud eo a glasken diwall en eur jom amañ atao, goude beza gouezet e oa Jeff war zouar ar re veo. Azaleg bremañ, arabad deoh en em jali tamm ebed - me a daolo evez wamañ tra ma vezo war-dro amañ. Ne ray diêz ebed deoh, ma hellan. E gwirionez ne gav ket din e ray Jeff droug ebed da zen e-pad pell: em a oh ober e dalarou sur a-walh.»

Ha gwir e oa. Pa'z eas Meredydd da glask kelou anezañ a-benn eun devez pe zaou, e oa ar paour-kêz den war e wele diweza, ha ne daole evez ouz den na tra. Re zinerz e oa eet evid gelloud distaga eur ger. Bez' e c'hoarie gand an dillad gwele evel ma vefe bet o klask eun dra bennag dianket. Ar bloaveziou foranerez o-doa kizellet anezañ e stumm eur sklisen. Para a ree e zaoulagad evel diou houlaouenn o tevi, ha kaoud a ree da Veredydd a-wechou eh anavezet anezañ. Med pa gomzas outañ dre e ano, e oa anad ez oa ar gweled hag ar hleved eet kuit dioutañ. Sarah doureier an ankou a rede en e gomz, hag ar ger nemetañ a gomprenas e vignon koz a oa « Nel ». Gouzoud a ree piou oa perhenn an ano-ze, rag klevet e-noa ar Holonel oh ober gantañ aliez. Ha setu penaoz, goude toud e gantreadennou, ez eas Jeff d'ar Béd Meur heb beza adkavet e wreg; daoust ma oa digouezet war hed eur bann-mên diouz toenn he zi.

Pa zegasas Meredydd ar helou d'e vestrez, e tiredas tristidigez ha levez, evel kezeg-red, war he bizaj da genta. Tenn a oa an helebini etre an daou zantimant e-pad eun nebeud momedou: a-benn ar fin e teuas an treh gand al levez.

Mad, cheñch a reas ar béd evid Meredydd er maner goude maro Jeff. Den ne deuas da houzoud piou oa ar reder-bro klañv a deuas da draoñ ar gêriadenn da ober e lamm er beurbadelez, nag euz a beleh e teue. Med ne oa ket lakeet en douar diwar goust ar barrez. Toud ar pez a ouezas tud ar vro a oa, e-noa mevel ar Holonel Pari paeet war e lerb pa oa beo ha pa oa marvet, hag e lakajont an dra-ze war gont e vrokusted anavezet. Den ne ouezas, nemed ar vestrez hag ar mevel, e oa an dispignou war

gont an Itron Pari. Ar Holonel koz e-unan ne ouezas netra.

Goulenn a reas digand Meredydd goude an interamant:

—« Anaoud a rez an den a zo bet interet en Iliz deh?»

—« Ya, aotrou Pari,» emezañ. « Anaoud a ran e gerent en Amerik — eur familh a vrud vad. Hag ez eo bet desavet gwelloc'h eged kalz tud. Med troet e oa da eva, ha redeg bro e-neus greet kazimant 'pad e vuhez-pad. Ne hellen ket lezel anezañ war gont ar barrez, p'aneveken e koun e dud.»

N'oa ket eur beh bihan evitañ rankoud ober neuz dirag e vestr. Rag ober neuz a zo atao eur beh ponnerroh eged beza eün. Ma n'he-defe ket an Itron Pari kuzet penaoz ez edo-hi eur vaouez dimezet kollet ganti he gwaz, pa deuas da veza heritourez d'he madou, ha da veva er Maner — pe m'he-defe disklêriet ar wirionez d'ar Holonel pa deuas da houlenn he dorn, he-defe diarbennet kalz trubuilhou diwami he-unan. Ha diwar Meredydd ken-koulz all. Med azaleg neuze e tougenas ar mevel hag ar vestrez ar beh asamblez, hag ar Holonel a oa dieub da ober war-dro e zouarou evel boaz. Med toud an dud a verze ar jeñchamant a oa deut enni, e-barz an ti koulz hag er-mêz. Kollet he-doa he lorch divuzul. Ne gerze ket ken gand he fenn sonn en êr, med derhel a ree he daoulagad an aliessa troet war-zu he zreid. Ne oa ket ken dibasiant e-keñver he mitizien, daoust ma oa hegaset gand diou pe deir anezo, ken na oa eur vez. Hag ar Holonel koz a zante e oa deut eur bannig heol tomm beteg ennañ ivez. Med den ne zante muioh ar jeñchamant eged Meredydd Pywel; ha ne oa den hag a ouie gwelloc'h chom en e renk eged Meredydd. Ne roas d'e vestrez tu ebed da gredi e-noa an disterra droad war he natur vad, na da zen ebed da gredi e-noa perz ebed er jeñchamant a oa deut dreizi. Hag evid pez a zell ar Holonel, ez edo ar mevel hag eñ gwelloc'h mignoned eged biskoaz. Setu penaoz e padas an traou e-doug war-nes eur bloavezh all.

Hag a-raog fin ar bloaz, setu an Adginivelez o tond er vro...

Eun abardaez-sul ma oa Meredydd Pywel o tond d'ar gêr goude beza bet digemeret da ezel e-barz ar vreudeuriez, ar henta den en em gavas gantañ oa e vestr. O hortoz anezañ edo, harpet ouz kloued ar park. Klevet e-noa kaoz ar paotr-koz euz ar pez a oa da zigouezoud, hag edo hanter harpet ouz ar gloued ken ma oa hanter zonnnet e izili. Eun nozvez reo yen e oa, soñj am-eus, ha n'oa ket souezuz e-nefe bet poan o telher eun tammig tommder

en e gorv. Ouspenn-ze, ne oa ket e vantell vraz gantañ. Med pa welas Meredydd, eh ankounac'haas dioustu ar riou e-noa paket, hag e lavaras dezañ:

—« Petra o-deus an dud-ze greet ahanout er vodadeg hirio?»

—« Netra, Aotrou Pari, nemed va digemeret da ezel, me ha Sam Wmffras,» emezañ.

—« Mad, gwell-a-ze evid Sam; va honikled a vezo lezet e peoh hiviziken. Med te avad n'out ket ar memez tra ha Sam; te zo eun den mad, jamez mezo, jamez eur ger divalo ganit — 'peus ket ezomm da vond e-barz ar vreudeuriez.»

Dihoarz edo ar Holonel Pari; biskoaz ne oa bet siriosh. Dond a reas an daelou e daoulagad Meredydd o klevet e vestr koz karet o komz anezañ gand gerioh ken enoruz. Eur pennadig e chomas dilavar.

A-raog m'e-noa gelllet fiñval e vuzellou da respont, e kendalhas ar Holonel:

—« Ne vi ket ar memez den evidon p'emaout e-barz ar vreudeuriez. Pa'z a tud fall e-barz, seurt Sam Wmffras, e teuont da veza tud vad; med pa'z a tud vad evelvoud e-barz, ne vezont ket heñval da houde. Dond a reont da veza treiz ha gaouiad.»

—« O! va mestr karet,» eme ar mevel, an daelou o redeg bremañ war e zioujod, « arabad deoh lavared an dra-ze. Me 'vezo atao ar memez den evidoh, ha gwelloc'h eo e tlefen beza en ho keñver hag e-keñver pep hini, bremañ p'em-eus en em lakeet da vond da heul Jezuz-Krist. Re a zoujañs am-eus evidoh evid dond da veza displeal deoh; ha sur on em-eus re a garantez evid va Zalver evid ober netra da zisplijoud dezañ. Dilezet em-eus peb tra evitañ, ha c'hwil, Aotrou Pari, ne reot nemed gounid diwar ze.»

—« Mad-tre,» eme ar mestr; hag e troas a-drumm war e zeulioh ha kerzed etrezeg an ti.

Meredydd a valeas war e lorch, ha ne lavarjont ger ebed an eil d'egile ken digouezoud dirag an ti. A-raog mond e-barz, ar Holonel a droas davetañ, a grogas en e zorn, a voustras anezañ stard, tra ma oa e zent o stlakai gand ar riou, hag ez eas e-barz an ti heb ranna ger.

—« Emañ an traou o vond da fall gand an den koz,» eme Mere-

dydd outañ e-unan; hag e kendalhas gand e hent war-zu a-dreñv an ti.

Antronoz veure, e oa fall-kenañ an traou gand ar Holonel – re fall evid ma hellfe sevel. Ar mitizien a rede d'al laez ha d'an traoñ, paotr ar hefrediou a oe kaset war gein « Louarnez » da gerhad ar medisin – an Itron Pari a glaskas distana poan he fried gand liennadou gwinegr – ha setu ar medisin gand e wetur a-raog m'ho-pefe soñjet he-doa Louarnez troet er horn-tro. Meredydd Pywel hag eñ en em gavas d'ar memez poent e-tal an ti. Ar zin genta e oa an dra-ze e oa eun dra bennag a-dreuz. Chom a reas aze ken na deuas ar medisin er-mêz, a-benn eun hanter- eur.

–« Penaoz emañ an traou?» a houlennas digantañ, ankeniet.

–« Fall, fall,» emezañ. « Paket e-neus ar Holonel eur barrad gwall-zroug, gweled a rit. Izelleet e oa e nerz war an diweza, ha ne hell ket harpa ouz ar hleñved.»

–« Peseurt kleñved eo?» a houlennas Meredydd a vouez izel.

–« Tan-skevent », oa ar respont. « Hag em-eus aon e pako an tan beteg ar penn ivez. E benn a zo ken tomm hag eur fom.»

–« Dañjer zo, Aotrou... dañjer evid e vuhez... dañjer braz?»

–« O! marteze e hello en em zacha,» eme ar medisin, o poueza war e heriou.

War-ze, setu Ruth, unan euz ar merhed, o tond er-mêz, hag o klask unan bennag, pennfollet.

–« Falleet eo dezañ?» eme ar medisin, gand anken.

–« N'ouzon ket,» eme ar grennardez; « mez goulenn a ra an Aotrou Pywel.»

Ar mitizien, na den war-dro ar Maner, ne zellent ouz Meredydd evel unan anezo. Dreist-oll e-doug an nao miz diweza.

–« Hag ar vestrez a gas ahanon da gerhad ahanoh,» emezi o trei ouz Meredydd; « hag a bed ahanoh da zond war-laez.»

–« Mad, dond a ran dioustu war ho lerh,» emezañ.

Hag en eur drei tu ar medisin:

–« Gwelloh deoh gortoz eur vunutenn pe ziu.»

Hag eñ d'al laez war-lerh Ruth. Ha pa gouezas e zaoulagad war

ar Holonel, e welas e oa echu e neudenn. Chom a reas abaf e-kichenn an nor, e zell stag ouz ar gwele. An Itron Pari a oa war he daoulin ouz an tu all, he bizaj sanket e-touez an dillad-gwele, hag he daouarn o waska unan euz daou zorn bleveg ar beajour a oa war var da bignad er vag-treiz. Berr ha behiet e oa e alan, evel ma oa alan Meredydd.

A-daol-trumm, setu eur galv krenuz o tond diouz ar gwele:

–« Pywel!»

–« Amañ emeon, mestr » hag ez eas Meredydd war benn e zaoulin ouz an tu tosta dezañ, hag e krogas en e zorn dieub gand e zaou zorn. Heb goulenn digand den, eh en em lakeas da bedi – hag e kendalhas da bedi, e-pad pegeid amzer, ne ouie ket. Med yenijenn an dom a zalhe etre e zaouarn a zigasas anezañ ennañ e-unan. Pa zellas ouz ar Holonel, e welas e-noa hemañ greet e dreuz e-pad m'edo Meredydd o komz gand Mestr ar vag; ha diwar ar mousc'hoarz a vane war e zremm, e kredas o-doa en em gomprenet, an treizour hag eñ.

Goude eun amzer deread, e cheñchas an Itron Pari heh ano evid an trede tro; hag e vevas e-pad bloaveziou evel an Itron Pywel. Ne droas ket kein d'an Iliz, na Meredydd d'ar chapel; med kaoud a rajont eun dachenn-zouar hanter-hent, hag e savjont o zeltenn wamañ.

Diwar **Y Lloft Fach** (1908)
gand **D. Rhagfyr Jones**
troet e brezoneg gand **J. Abasq**

Notennou:

ober an dro: goulenn an aluzenn.

bann-mên: jet de pierre (hervez Vallée)

Tan-skevent: kleñved ar horzennoù skevent (hervez Vallée)

kiañv eo gand merh an ti-all: kared a ree merh an ti all.

Enezenn ar pevar-houlz amzer

Yenijennig, an eskimoig, a lakaas beg e fri er-mêz euz e lochen-nig. Yennoh c'hoaz eged an tammouigou skorn a oa a-ispill dindan doenn e iglou e teuas eur mouch avel da floura e zremmig velen ken na serras e zaoulagad du gand ar riou. « Brr » emezañ. Santoud a reas neuze an anoued o kregi kreñvoh-kreñva ennañ ha kercent e sankas donnoh e zaouarn e-barz e hodellou. Ne oa ket ar yenijenn-ze evid e laouennaad. Leiz a zoñjou c'hwero a oa en e spered. Heb gouzoud dezañ e lavaras a vouez uhel:

—« Me a zo eet skuiz gand ar vro-mañ. Bepred e vez wami liou gwenn ha reud ar goañv. Ingal e teu an amzer fall da lakaad ar mor da skorna, an erh da goueza, an oabl da deñvallaad, ar stered da veza morlivet oll. Ken abaf eo an heol amañ ma n'eo ket evid skuilla an disterra tommder ha chom a ra dalhmad, evel al loar, a-istribill a-uz d'an dremmwel, miziou-pad!»

Da lavaroud gwir, e chome Yenijennig war doenn ar béd e leh ma vez ar mor karget gand kement a skorn kaled ma n'eo ket evid diskouez e liou morse. War doenn ar béd! Pe e Pennhael an Norz evel ma oa bet lennet gantañ el levriou douaroniez. Ar seurt levriou a blij e kalz dezañ. Bamet e chome o selled ouz o skeudennou brao. Enno en-doa kavet liou marzuz broiou pell dianav dezañ. Ar gwel euz kement-se en-doa lakaet ennañ c'hoant braz da dehoud kuit pell diouz an erh hag e splannder gwenn-kann. Se ne oa ket abalamour ma ne gare ket e vro henedig. Tamm ebed! Med gand an hiréz hag ar velkoni e oa bet aloubet e galon yaouank. Kement ha troha berr, felloud a ree dezañ anavezoud ar houlziou-amzer all. Pegen plijuz ha souezuz e kave pajennou e levriou! Eun dudi selled outo! Diwar neuze e kave arabaduz-meurbed arvest an natur gouez a gelhie anezañ a beb tu d'e iglou.

Neuze, pa lakee e ijin da brederia diwar-benn ar broiou pell-ze, e kare lezel e spered da nijal d'an neh, en tu all d'ar béd, war-du eur vro vihan gaer heh ano iskiz: Breiz.

Eno, e veze distag ar pevar houlz-amzer. Ha bro ar stered lugernuz a zegase dezañ huñvreou hud eun enezennig, strobinel-luz, ar pevar houlz-amzer wami.

Kerkent ha serret e zaoulagad gantañ, setu-eñ war vourz eur vag dre lien o kas anezañ etrezeg an enezennig-ze. A-du e oa an avel, evel just, evid kas anezañ war-du an donvor. Ken plijuz e oe e veaj ma ne wele ket an amzer o vond e-biou.

Pell e oa dija an eskimoig diouz skorngrehiou ramzel e vro. Ankounac'haet e oa an erh, ar skorn, ar yenijenn, hag all gantañ. Ne oa ket e galon evid kaoud an disterra keuz outo. A-uz d'e benn ne oa nemed an oabl sklér hag en e greiz an heol o lugerni. Gand kement a nerz e pare e vannou ma seblante d'ar paotrig e felle d'ar voul vraz alaouret skuilla he bennoz divent war ar béd a-bez. An heol! Ne oa ket ar voul vorlivet a oa ken gwadeg he lagad o vond da guzad ruzder he mez e brumenn fetiz penn-hael an norz. Hag ar vag da verdei war an dour sioul glasoh c'hoaz eged an neñv. Ken pell e helle mond gand e lagad e spurmante kelh braz an ehonder tro-war-dro dezañ. Eur poent bihan-bihan e oa al lestr e-kreiz ar mor. Med e-giz eun arar o tibrada an douar e faoute an houl ken êz ha tra.

« Sell 'ta! Med sell 'ta Tadig! Eur bern pesked iskiz 'zo o nijal a-rez d'an dour!»

Eur wech an amzer e teue unan anezo da goueza war bont ar vag. Kemer a ree Yenijennig ar paour-kêz en e zaouarn hag en eur floura anezañ e taole goustadig al labous-mor espar-ze en dour don e leh ma veze kollet al liou anezañ.

Edo ar vag o kemderhel gand he hent war-horre sioul ar mor pa welas Yenijennig ar voul vraz melen alaouret o vond da guz. Ar wech kenta euz e vuhez e oa. Beh en-doa kredi e zaoulagad! Edo an heol o koueza evel pa vije bet sachet goustadig gand an dremmwel! Ha dre ma koueze ez ee bihannoh-bihanna kalon ar paotrig en e greiz. Ruz-flamm e teue an oabl da veza, heñvel

ouz eur forn hovel, eur baloñs ramzel enni. O tostaad ouz ar horn-ze euz an neñv e teue ar houmoul gwenn da veza roz-tener evel drajeou badeziant Yenijennig. Kerkent erru e-tal an heol, e lakee skleuriou diweza an deiz o vervel, an tan war ar wennder-ze. An tan en êzenn! Pegen brao! Ruzia a ra an oabl bemnoz pa vez deuet ar poent dezañ da deurel e sklêrder diweza. Ruzia a ra e-giz dioujod eur paotrig tapet o laerez madigou e kanastell e vamm.

Pegen dudiuz e kave Yenijennig ar ruzder-ze o vond mesk-ha-mesk gand glaster an ehonder difiñv. E sioulder an natur hanter-vorgousket edo an deiz oh echui gand e red. A-hont, e teue tamm-ha-tamm, linenn eeun an dremmwel da lugerni e-giz eun neudenn aour bennag taolet war an dour gand bizied mibin êlezi-gou ar baradoz o nijal sioulig war horre roz ar mor klouar.

Hag an heol o koueza bepred! O koueza evel p'e-nije fellet dezañ lakaad, war eun dro, an dour glaz hag an neñv da virvi. Setu-efñ o souba e grommenn nêt ha sklêr e meleour touelluz an dour. Eul lamm a reas Yenijennig gand ar spont.

« Mamm! Mamm! emañ an oabl o leski hag an heol o veuzi! »
« N'eo ket, va mabig », eme ar vamm. « Bez dizoursi. Heb dale e vi e-tal Bro an Arvor ha gwele an heol eo ar mor e Breiz! »

Setu bremañ damguzet ar voul vraz a-dreg linenn eeun an dremmwel. War zigreski ez a ken ne chom mui war he lerb nemed he ruzder oh entana an neñv. Setu, a-benn ar fin, ar hresk diweza, ha goude-ze... netra, nemed liou ruz-tan an ebr o hortoz ar steredenn genta evid kregi gand an noz.

Neuze, e kalon ar paotrig, e-kreiz from tener e ene, e sioulder an noz, ez eus savet eur vouez sklintin ha don. Mouez eur vaouez e oa, o kana komzou dudiuz nevez savet a-ratoz evid degemer anezañ e Breiz.

Hirêz ar ganaouenn-ze a lakaas an eskimoig da huanadi. Pegen pell e oa diouz e vro henidig... Ha setu-efñ o tostaad ouz enezennig e huñvre. Merzoud a ree dija ar beg uhella anezi o toulla ar mor... pell... pell... Med ne oa ket e eston evid echui hag e-kerz e veaj war vouez e lestr marzuz e welas dour, e-leh erh o tiskenn euz an oabl...

Ya! gwelet en-deus Yenijennig eur seurt erh iskiz, dourenneg, takennou ponner anezañ, o vale war ar mor gand e vil troad mibin. Eur gael hag eur stign a oa war eun dro o vond war-raog. E-giz eur froud e oa ar barrad o koueza. Heñvel ouz eul liñsel du e oa deuet an oabl da veza ha goloet e oa bet ar mor gand ar skeud teñval-ze. Liou ar hañv a oa oh astenn e dristidigez war an natur a-bez. War deñvallaad ez ee ar béd en eun doare mantruz. A-greiz-oll e savas an avel. E berr-amzer e lakaas an hou-iennoù da lammad uhelloh-uhella, spoum e-leiz warno. Edo ar mor o fulori gand kement a nerz ma teue e oll horre da eonenni. Kribennou gwenn ar gwagennou o vond mesk-ha-mesk gand teñvalijenn ar hoabr a roe da Vreiz he liou gwirion evel ma felle dezi heti degemer mad d'ar beajour yaouank. Peb gwagenn o lammad uhelloh-uhella a oa heñvel ouz eun teodig, c'hoant gantañ lipad ar glao evid kuñvaad an holen a vire enni. Ar mor o lonka an neñv a spontas an eskimoig sabatuet oll. Med kerkent ha lonket an oabl gantañ e teue an natur da sioullaad endro. Ar glao hag ar mor a davas gand o reuz ha lezel a rejont ar gwagennouig da luskellad ar vag.

Setu, a-greiz-oll, eur mor a laboused, o flu gwenn o nijal en eur seurt koroll kelhieg a-uz d'al lestr. Pa vez eul labous war ar mor, n'emañ ket pell an douar-braz ha kement a oa anezo ma oa teñvallaet sklêrijenn an heol ganto.

Med, pegen iskiz e oa dañs an evned-mor. Gand kement a nerz o-doa an oriaved lakaet o diouaskell da flapa ma ranke an avel chom a-zav gand he red ouz ar skoill espar-ze. Distenn e teuas da veza goueliou ar vag...

Neuze, Yenijennig, aon ebed ennañ, a spurmantas frêz an enezennig. Eur berlezennig war meleour eur goantenn! Eur berlezennig liezliou o flammia e doare ma kredas ar paotrig e felle dezi sila bannou an heol dre he zri du. Rag tri du he-doa. Hag eur stumm espar a oa dezi: stumm eur biramidenn. « Enezenn ar biramidenn » a reas dioustu Yenijennig anezi.

En tu kleiz anezi, war he fas kenta, an hini a oa tal-ouz-tal d'ar vag, o-doa ar gwez o deliou hir. Ar raden-bleiz, deuet da veza rouz gand tomnder eun heol didruez, a holoe stank an douar skamilet. War skourrou uhella ar gwez, edo laboused ar broiou

pell o flu liezliou, o trei garo o fenn war-du an oabl glaz-meurbed. Ha pep hini ha pipial hervez e faltazi diroll. Edo an edennoù ponner o stoui etrezeg an douar o fennouigou alaouret. Dour ar poull-kanna a oa eet da hesk. War drêz ruz an aod e oa eun trespellad olifanted o vale sioul-sibouron...

An tommder... Ar sehor... laboused tremeniad. An oll draou-ze a zegasas d'ar paotrig ar zoñj euz an hañv. Ya! Kavet e oa bet an hañv gantañ. Med ne chomas ket da zispourbella e zaoulagad outañ. Dedennet e oe e zellou ouz eil tu an enezenn.

War fas dehou ar berlezenn vor, e oa ar parkeier goloet gand bokedi-lêz. Ar gwez o-doa o deliou nevez ha dour fonnuz ar feunteunioù a zeue fresk da zoura o gwriziennou leun a zeo. A-gaoudou e teue ar gwennili da glask goudor dindan mein glaz an toennou. Hag int da nijal flour, o kas a beb eil eur heotenn, evid farda o neiz. E peb leh strujou nevez o-doa toullet an douar. An tiez o-doa mogerioù nevez razet. Edo ar béd koz oh adkavoud e nerz war-lerh kousk hir ar goañv.

« Paradoz ar bleunioù – Paradoz an dour-red – gwennili o sevel neizioù... Med... an nevez-hañv, an hini eo? » eme Yenijennig mezevellet oll.

Trede tu an enezenn a oa gleb ha teñval. Eur wech an amzer e veze diframmet an oabl gand skleur spontuz eul luhedenn ha kerkent war he lerh e teue ar gurun da strakal. Eun avel yen a lakae an deliou da goueza euz ar gwez ha nijal a reent, truezuz, kollet ganto o liou splann. Etre diou goumoulenn deñval karget a zour e kleved kleierigoù eur chapelig o seni trist ar hlaz.

Glae e-leiz, avel diroll, deliou seh o nijal forz pegement, kleier an anaon... Ar gwel euz kement-se a lakaas Yenijennig da zoñjal er mizioù du. Evid ar wech kenta e wele an diskar-amzer.

Ya! Kavet e oa bet gantañ an tri houlz-amzer a ree kement a ziouer dezañ...

Trumm e soñjas. « Med peleh emañ ar goañv? N'em-eus ket gwelet al liou anezañ c'hoaz. »

Kaer en-deus bet klask, ne gavas roud ebed anezañ. Peleh e oa an erh? Peleh e oa ar skorn? Pebez piramidenn iskiz. War eun dro en-doa gwelet an tri fas anezi. Strobinellet e oa, a-dra-zur. Tri fas en-doa gwelet! Unan a ree diouer dezañ en eun doare krisoh-krisa. Ne ouie ket Yenijennig e vage kement a garantez evid ar goañv...

A-uz d'e benn e veze bepred koroll al laboused o troidella en oabl. E oll zellou a baras warno. Trei a reas e benn. Hag e welas...

En e gichenn e oa ivez teir bag all chomet a-zav, beb a gurunennad evned-mor o trei a-uz dezo. Teir bag all hag a oa ken heñvel ouz e hini, ma seblantas dezañ eh anaveze an tri baotr a oa war o bourz. Rag, gwir, eur paotr euz e oad a oa e pep hini anezo. Eveltañ, e teuent euz broiou pell. Eur morianig, eun indianig hag eur japanad bihan a zelle outañ souezet oll. Hag ar pevar hanfard da chom dilavar kollet o skiant vad ganto! Ne oant ket evid chom da henaouegi ouz an enezenn. E-biou ez ee an amzer heb gouzoud dezo.

A-benn ar fin e teuas endro ar gomz dezo. Eur bam! Pep hini anezo a gomprenne eston yez an tri all. Goulenn a rejont 'ta an eil digand egile: « Piou out-te hag euz peleh emañ out tond? »

Sebezet e chomjont o-zri pa oe klevet ganto respont an hini all... Ha pep hini anezo da gregi gand e zanevell.

« E bro-Afrika e vez bepred an heol o para e vannou lugernuz », eme ar morianig. « Me a zo skuiz gantañ. Deuet on emañ evid klask ar pevar houlz-amzer. Gwelet em-eus, da genta toud, ar goañv, e erh splann. Eun dudi selled outañ. Gwelet em-eus an nevez-amzer he bleunioù dispar hag an diskar amzer gand e deñvalijenn hlaharuz. Pegen brao! Med n'em-eus ket kavet an hañv. Siwaz din! war va lerh eo chomet! »

« E Bro-Japan emañ o chom », eme ar japanad bihan. « Ha n'eo ket heb abeg eo bet lesanvet ar wennilienn, em bro, „Labbous an nevez-amzer“. Me ivez a zo eet skuiz gand ar bleunioù nevez-digoret hag ar bokedi-lêz peurbaduz. Setu perag ez on deuet war-du an enezenn-mañ. Felloud a ree din klask ar pevar »

houlz-amzer! Siwaz din! Gwelet em-eus an hañv hag e splannder dispar, ar goañv ken brao gand e erh gwenn-kann, an diskar-amzer hag e vleuniou kala-goañv... Med siwaz din... Kaer em-eus bet furchal ha firbouchal n'on ket deuet a-benn da gavoud an disterra liou euz an nevez-amzer! Em bro-me eo chomet a-dra-zur!»

« E Bro-Amazonia emañ va lochenn », a lavaras an Indianig. « Nag a zour em bro! Kement a deñvalijenn 'vez a-hed ar bloaz m'emaon tost da gredi e pouez warnom skeud teñval eun diskar-amzer divuzul. Me a zo eet skuiz gand seurt tra ha deuet on amañ evid klask ar pevar houlz-amzer. Gwelet em-eus ar goañv e skom kaled, an hañv o skuilla e dommder war ar béd, an nevez-amzer o tigeri brao he bleuniou diniver... Med evid pez a zell ouz an diskar-amzer... Peleh e oa? Ne oufen ket hel lavaroud. Miret eo bet dindan goudor gwez va bro, heb arvar ebed!»

« Eun estlamm eo din ho komzou!» eme Yenijennig d'e dro. Eveldoh, am-eus gwelet tri houlz-amzer. Ar re a ree kement a ziouer din hag en o mesk em-eus kavet ar re a vank deoh. C'hwi, da vihanna, hoh-eus gwelet an hini a vank din: ar goañv. Rag, siwaz din, n'em-eus ket gwelet va houlz-amzer-me war an enezenn achantet-se! Ar holl euz kement-se en-deus lakaet ahanon da veza aloubet gand eur mor a hwervoni ha n'on ket evid padoud gand kement a dristidigez!»

« Me ivez, evid an diskar-amzer » a lavaras an indianig.
« Me ivez, evid an nevez-hañv » a lavaras ar Japanad bihan.
« Me ivez, evid an hañv » a lavaras ar morianig.

Med a-boan distaget ar homzou-ze ganto e savas en neñv mouez al laboused achantet.

« Genaouegi ma'z oh! Setu perag n'oh ket deuet a-benn da vond pelloh gand ho c'hoant gouzoud. Digorit braz ho tioukouarn, paotredigou! Te, ar morianig, Te ar Japanad bihan, Te an eskimoig ha Te an indianig, ez oh dre reolenn an natur, an hañv, ar goañv, an diskar-amzer hag an nevez-hañv. Evel-se bezet greet! Ha netra ken! Deuet oh beteg amañ evid klask eun dra bennag a zo ennoh hag ennoh hebken. Ha penaoz e hellfe eur meleour selled ouz e skeudenn ennañ e-unan?»

Kerkent ha lavaret ar frazennou-ze ganto, setu al laboused marzuz o nijal kuit a-denn-askell etrezeg an enezenn. An avel, adkavet ganti he nerz gwirion, a lakaas ar bagou da drei ouz an tu-eneb.

A-benn eur pennadig amzer ne chomas war ar mor nemed les-trig an eskimoig o skei etrezeg e vro.

Ar paotrig a zihunas souden. An anoued a zo eur hi o kregi stard e krohenn an dud.

« Ar skiant a zo gand an evned-mor » a zoñjas Yenijennig, adkavet gantañ beaj e huñvre. « Perag 'ta, an diaoul, mond da glask ar pez a zo du-mañ hag a rankom miroud ennom e-giz eun teñzor?»

Hag e sellas ouz e vro henidig gand eur garantez kreñvoh eged kustum.

Eun nebeud kammedou en-doa greet er-mêz. Dindan e dreid e ree an erh e dammig sonerez. « E peseurt bro e vez klevet seurt kanaouenn? E peseurt oabl e heller gweled, war eun dro, an heol hag al loar e-kreiz an noz? Ken brudet eo deuet heol an hanternoz a laka eur mor a dud da gaoud an hiréz anezañ... » a huanddas ar paotrig.

War eun durumellig skom edo eun ours gwenn o kousked c'hweg evel pa vije bet ankounac'haet eno war-lerh ar barrad erh diweza. Pelloh e rede eul louarn arhantet war-lerh eur honikl gwenn. Dre-oll e wele ar wennder o skuilla he glannder war beb tra. En dour e kouronke sioulig eun olifant-mor. Eun tropellad berr-askelled o fri plad ha farsuz a oa o vale...

En desped d'ar yenijenn e teuas e galon da domma.

« Perag? En donna euz e voud e savas neuze an enezenn achantet he mouez... »

Perag? E donna euz e voud e savas neuze an enezenn achantet he mouez...

« Perag? Daoust ha ma n'eo ket huñvre pep hini ahanom ana-

vezoud ar béd a-bez?»

Evid ar wech kenta euz an devez e vousec'hoarzas ar paotr...
Eun heol alaouret a baras war e zremmig velen.

J.C. Miossec.

Bet eur meneg e kenstrivadeg ar Priz **Per Trepos** (FR3), e 1982.

Galv da goumananterien Vrud Nevez

Lakeet on-eus en or zoñj sevel eur geriadur braz **brezoneg-galleg** ha **galleg-brezoneg**. Ezomm zo meur a hini evid dond a-benn euz eur seurt labour, memez ma'z eus dreist-oll da stroba ha da adskriva fichennou bet savet dija.

Paeet e vo pep hini hervez e labour, med n'hellom ket c'hoaz lavared pegement.

Kasit kelou dim dioustu. Renket e vo da vad al labour e penn miz ebrel.

Trugarez en a-raog,

Brud Nevez.

Planedenn

Kelaouenn oll-vrezoneg
o tond er-mêz peder gwech ar bloaz
80 lur
6, ru Longue Montroulez

Salm 148

Allelouya!

Euz an neñvou, meulit an Aotrou,
meulit-eñ en uhellou!
meulit-eñ, e oll êlez,
meulit-eñ, e oll vedou!

Meulit-eñ, heol ha loar,
meulit-eñ, oll stered skeduz,
meulit-eñ, neñvou an neñvou,
gand an doureier euh d'an neñvou!
Ra veulint an Aotrou:
war e urz int bet krouet;
o diazezet e-neus evid atao,
dindan eul lezenñ ha biken ne gemmo!

War an douar, meulit an Aotrou:
crevent ar mor, donder an islonkou;
tan ha grizill, erh ha lusenn,
aveliou ruz, kannaded e gomz;
meneziou, oll dorgennou;
gwez frouez, oll zedrez;

loened gouez ha loened doñv,
naered a ruz, laboused a nij;

rouaned ar béd-mañ, oll boblou,
priñsed, oll varnerien an douar;
paotred ha merhed yaouank,
kozidi ha bugale!

Ra veulint ano an Aotrou,
rag dreist eo an ano-ze, hag en- hebken;
treh e hloar d'an douar ha d'an neñv!

Kresket e-neus galloud e bobl,
lorh e dud fidel,
mibien Izrael, e bobl muia-karet!

Allelouya!

Salm 150

Allelouya!

Meulit Doue en e zantual,
meulit-eñ en oabl e nerz!

Meulit-eñ en e daoliou-kaer;
meulit-eñ en e vrazded divent!

Meulit-eñ gand dason ar horn;
meulit-eñ war zelenn ha kitar!
Meulit-eñ gand koroll ha taboulin;
meulit-eñ war rebed ha fleüt!
Meulit-eñ war 'r zimbäl skiltruz;
meulit-eñ war zimbäl an trehlid!

Ra vo meulet an Aotrou
gand peb buhez!

Allelouya!

Brezoneg gand **K. Riou.**

O haloupad war henchou Breiz-Izel

Eun enklask war ar brezoneg

XI

Meur a dra all em-eus kavet c'hoaz o kas va enklask endro.

Marteze ne gredor ket ahanon pa lavarim em-eus kavet e kreisteiz departamant Penn-ar-Béd daou vourk, Keriti-Penmarh hag Enez Tudi, hag a oa, n'eus ket pell c'hoaz, kollet er vro vigoudenn, evel diou enezenn war ar mor braz. Toud an dud endro dezo a deue ganto brezoneg ar Vigoudenned, a veze gwisket evel ar re-mañ, hag a veve e-giz ar re-mañ, rag toud e oant Bigoudenned. Med en Enez Tudi hag e Keriti, ne oa nag ar memez kôze nag ar memez gwiskamant nag ar memez gizioù. Rag ar re a oa o chom en daou vourk-se ne oant ket Bigoudenned ha n'en em reent ket ouz ar Vigoudenned eur gwaz euz Enez Tudi ne zimeze ket d'eur Vigoudenn nag eur plah da eun den euz Pont 'n Abad pe Bouldreuzig. Perag? Abalamour eno e veved, e kôzeed hag e vezed gwisket evel e Douarnenez. Koef merhed Enez Tudi ha re Keriti a oa ar « penn-sardin ». N'em-eus ket gelllet gouzoud na perag na penaoz na peur e oa deuet kôze, gwiskamant ha gizioù Douarnenez en daou vourk-se. Soñjal a heller e oant bet digaset gand pesketaerien deuet da chom di, evel ma kaver anezo bremañ e kêr La Rochelle. Er porz-mañ n'o-deus digaset ganto nemed o yez. Gwisket int eno evel ar besketaerien all, re La Rochelle ha re Saint-Jean de Luz, med o hleved a heller o kôzeal brezoneg partoud war o bag ha war ar hae.

Med gwechall, pa oant en em gavet en Enez Tudi hag e Keriti, e talhent stard d'o hôze evel d'o gwiskamant ha d'o gizioù.

Bremañ, hervez ar pesketaer a responte d'am goulennoù, toud an dra-ze a zo echu, med n'eus ket gwall-bell zo c'hoaz, emezañ. Deuet eo tud Enez Tudi ha re Keriti d'en em veska gand ar re all endro dezo. Dimezi a reont

zoken d'ar Vigoudenned ha kement tra a lakae anezo da veza disheñvel n'eus netra ebed ken outañ.

Ar memez den e-neus lavaret din c'hoaz ez eo bremañ merket kentoh kôze tud Enez Tudi gand hini tud Enez Sun, rag deuet ez eus meur a hini euz an enezenn da chom er bourk.

Traou all souezuz em-eus kavet c'hoaz. Bez' ez eus meur a barrez, toud an enezennou ha toud parrezioù bord ar mor e Bro-Leon, hag a ne anavezer ket enno plant hag anevaled anavezet mad e Gorre-Leon. Perag? Abalamour ma ne veze ket gwelet eno nag ar plant nag anevaled-ze.

An dra-mañ marteze a heller e gavoud estonabl, pa ouezer eh anavez an oll, pell 'zo, er herniel-bro-ze evel er re all, memez ar vugale, ano galleg ar plant hag anevaled-ze.

Anaoud a reont zoken ano galleg plant hag anevaled hag a n'eus ket outo e neb leh nag e Breiz nag e Bro-Hall, evel hini ar gwez-kokoz, ar gwez-orañ-jez hag all... zoken hini ar baobab, hini al leon, an tigr hag ar hañval ha me oar c'hoaz. Med ma'h anavezont an anioù-ze ez eo abalamour ma'z int bet desket dezo er skol, er skoll halleg. Ano brezoneg ar plant hag hini anevaled ne vezent ket desket e skol ebed. Setu ne helled gouzoud e Breiz e brezoneg nemed ano ar re a veze leh d'o gweled. Ar re all, ar re ne weled ket anezo biskoaz, ne helled ket anaoud anezo, peogwir ne veze ket a dro d'o deski.

En enez Sun, en enez Eusa, e Beg-ar-Havr (e-kichen Morgad), n'eus bet glesker ebed biskoaz. Re zeh, kredabl, eo an douar. Hag an dud ne anavezont nag ar ger « glesker » nag ar ger « ran ». An dra-ze goulskoude ne vir ket outo da houzoud ar ger galleg « grenouille », desket ganto er skol.

En enez Eusa, n'eus bet jamez nag eun askell-grohenn, nag eun heurusin (lod a lavar eun „debrer-avalou“) nag eur haz-koad ha den ebed ne anavez ar gerioù-ze. Goulskoude eh anavezer ar ger « kistin », daout ma n'eus bet biskoaz gwezenn gistin ebed en enezenn. Med n'eus ket da veza estonet: tud an enezenn, pa deue dezo mond d'an douar-braz, da Gonk-Leon pe da Vrest, a zigase ganto a-wechou kistin d'ar gêr, pa veze ar poent, d'an diskar-amzer.

Ar besketaerien ivez, e bord ar mor, pa houlenner diganto ano an ostillou a vez laboureret ganto en tiegeziou pe hini al labourioù a vez greet ganto, ne vezont ket gouest d'o lavared.

Gerioù a zo hag a veze greet afiez implij outo tregont pe zaou-ugent vloaz 'zo. A-leiz anezo a zo bremañ eet da fall. Ne vezont ket klevet ken. Den ebed

koulz lavared ne anavez anezo ken. Goulennit 'ta, war ar mêz, endro deoh, ano an amprevan bihan a vez greet outi « le coquelicot ». Mil boan ho-po o kavoud tud hag o-deus dalhet soñj euz ar gerioù brezoneg « biohig » pe « c'hwillig-Doue » evid an hini kenta, ha « roz-ki » evid an eil. Perag? Abalamour ma'z eo bet distrujet eur pennad brao a zo dija an amprevan hag ar fleurenn gand al louzeier fall a vez taolet bremañ ken brokuz war ar parkeier.

N'eus biohig-Doue ebed ken, n'eus rozenn-gi ebed ken. Ano an amprevan hag hini ar fleurenn (ha meur a hini all evelto) a zo eet da goll. Lavared a reer emañ bremañ o klask lakaad biohed-Doue da zond adarre er vro. Kavet ez eus e ree eur vad iskiz d'an drevadou en eur zistruja, gweloh eged al louzeier, ar c'hwen glaz a stag ken niveruz ouz ar plant yaouank hag a vir outo da greski.

Med ma heller marteze dond a-benn da skigna an amprevan er vro, e ano brezoneg zo kollet da vad. Ne deuo ket ken endro; kemeret eo e blas gand ar ger galleg.

Yves Miossec.

Fañch Broudig

Ar béd o trei

Eun dibab pennadou a-vremañ evid ar grennarded

Eul leor 100 pajenn: 15 lur (kuit a vizou-kas).

Hekleo Traoñ-Bouzar

XVIII

Lavariou on tud e yez koz Bro-Leon.

« Beza kristen a zo c'hoarzin ha leñva, ha gouzañv ha meull!
Hag ivez kared a-dreuz peb liou an dud hag ar vuhez! »

Ma lavarfen eun tammig gwelloc'h eun dra bennag diwar-benn an doareoù da gomz, da gaozeal distag al lavariou hag ar gerioù, an troioù implijet e-touez on tud! Me, sklêr eo, a gav dudius an dra-ze. N'ouzon ket avad ar pezh a zoñjtit dre ma n'ez on ket sur d'henn lavared deoh evel ma fellfe. Va digarezit ma ne gavan nemed doareoù « glaz » a-walh, hag a ya mad e brezoneg, mez e galleg ne roont mui netra, daoust da veza goulskoude « gall »-kenañ.

Nomblé gall! – An dra-ze oa e her! a lavare gwechall ar Hlastrig, va mestr koz en Enez Rouz, o komz diwar-benn or mêr koz, Yvon Gabalan. Ger Yvon a oa braoig! hag e lavare anezañ heb ehan. Mez a-wechou ar gerioù-ze a oa danvez kevatal da zakreou. Ral goulskoude gand Hano Doue, da vihanna e sklêr. Evel-se *nondédié! Tribédié!* Kement-mañ n'eus ket a dalvoudegezh « ger » sklêr kennebeud, nemed ez eus c'hwez ar groz gantañ, heb muioh. Ha zoken sakreou all dismegañsuz muioh a goll êz a-walh o fouez « meno » evel *Pennad gast! Mellad gast! Gaster koz!* Med setu aze ar re hrosa.

O! Kri ha jaogell, an dra-ze a veze, sur a-walh, war ar hezeg ha zoken a-wechou war ar zaout. Ni a lavare etrezom: – *Sell 'ta! Emañ adarre an hen-ma-hen e trein da langachad war e loened!* Eur wech all bennag e kleveh deg kwech diouz renk: – *Saout an Traoñ Bouzar war ar gwiniñ-du!* Blejadennou brokuz greet gand kornaillennou kreñv ha leun a volontez vad diwar unan pe unan euz an tergin diwar-dro.

Kement-mañ a zigas din da zoñj eun abadenn goz braoig kontet e-touez an dud diwar-dro. Bez' eo istor eun ozah o vouzad e wreg e-pad daou pe dri dervez, hag a deuas endro d'ar gêr buanig ha brao c'hoaz! Mari Goz, unan dijipot honnez, a zistagas kement leue a oa en he hreier hag o laoskas war ar gounidegezh dija o tihodi. Setu ma oe klevet pres-tig: – « *Leueou Kêr-Vouzig... war an eost!* »

Hag ar galv azlavaret a oa inkantet da hekleioù an oll dergin. Mari a ouie mad ar pezh a ree; hag e frote he daouarn o klevad an « téléphone arabe ». – « An taol-mañ e tivouzo buan, ar mehiog-se! » emezi, ouz e weled o tifourcha bremañ da guitaad e jed ha da reded... a beb tud da graouia a-nevez al loened fall-ze!

Evel just aze dirazoh e oa sur eun abadenn heb c'hoarz ha « kalz muioh eged moged eur horn-butun »! Ha setu hemañ 'ta o pehi ken a strake hag ez ee an taoliou gantañ ken a zutel! – « *Petra an diaoul hañ* » a ree en eur hini sklêr deoh... Beteg ma chomas adarre, eur wech nevez all, mestr war an dachenn, goude beza rampet ha dirampet, ha tanfoueltret ar mastin war-lerh e leueou. Ar re-mañ o taoulammad, sonn o lostou en êr evel banniellou, evel ma vije oll gelien lard ar vro war o lerh pe o voudinellad dezo en o skouarnioù!

Evel-se n'oa ket chomet da rani. Kollet e voutou pell a oa, anad deoh. Trempet oll e galson ruz war e relegou, ken ruz all e gribell, an haillon, ar genaoueg, ar grochard, ar glapez, an tamm higenn fall ha fallagr, a zoñje hag a gavje c'hoaz bremañ rebechou da ober d'e hanter-diegezh, a welit? gand kant *nondendi*stag ha *sakrondeien!* – « Ya! Droug a-walh a zo ennon! Ha me 'mije greet gand plijadur ludu butun ganez! »

Eben avad, ne ree ket zoken a van. Pell zoken da gaoud c'hwen en he loerou dirag he aotrou. Hag e kroge adarre da jalbotad sailladou goueilien d'he moh. Rag gand homañ, o c'hoarzin a-zindan, bremañ ar moh a oa oll er gêr. Eur mousc'hoarz a deue zoken war he muzelloù: – « Va Yann gêz! Echu ganez ar hrampouez-mouzig! Te 'zo sotoh eged va reor-me! Eur gont a zo, asa! Sell aze! Kê da gerhad da zaill ivez, pe e chomo c'hoaz saout da horo! » Da lavared eo: eun tiegezh e leh ma vez greet al labour a-dreuz, a zo diskempenn.

An ozah a oa adarre boud ganti, daoust dezañ d'en em ziskouez di-habask-kenañ..., o tapoud ar skaoñ da horo... Hag o klask grozmodad... Mez netra! Dre ma chome e deod bazoulenn ouz e staoñ! Ne ouie ket petra lavared. E gloh n'en-doa bazoulenn ebed ken! O! Soñj a zalho er memez tra, a zoñje Mari. Mez e dra da bep hini! Hag e voned da Dobi! Ha n'eo ket hepken gand bleo melen ha koantiri e vez lakaet ar pod da virvi. Red eo beza maouez a benn ha dreist he lod derveziou!

Mez diwallit goulskoude da reded diou had asamblez! Gouzoud e ran-koh ar pez a fell deoh. Ha Mari a zoñje c'hoaz: « gweloh eo eur had paket eged diou o reded! »

An ozah, eñ, a huanade: « Gand esperañs ha dour yen e vez maget meur a zen! Red eo din diwall da gendalher d'ober ar penn-du. Ha da betra servij din mond da glask pemp troad d'ar maout? Red eo din lakaad skiant ennon. Ha ma lavarfen dezi: « Dalh mad! Ha me gigno! An hanter euz ar hrohenn e-pezo! Greom a-nevez ar peoh gand ar Vari! Kement-se a vezo koulz eged mond da Venez Arre da drei ar mein da zeha! Koll a rez da amzer o telher penn dezi. An dra-ze ne dalv netra. »

Pa emao war var da vond da dreina evel-se ar hi a-bouez e lost! Oh ober evel-se, emao o vond d'ar rivin. Troad ar leue a zo bet adarre en da henou, paotr! Meur a dro dija! Ne ouiez ket petra da respont, neketa? Mari a oar diouzin... Ha tenna din ar haz a-zindan ar gwele! O tivinoud hag o tond a-benn euz va zroiou kamm. Dreist-oll, bremañ p'eo stag ganti ar fars er pod! Ya! A-dra zur: dougerez eo! Gwir a-walh eo, evid plijoud d'an oll e ranker beza fur ha foll!

Pe c'hoaz, e-peus chañs gand da Vari. Garr voan ha garr loan! Bez' eo eul labourerez kreñv daoust ma n'eo ket ledan. Ha biken garr voan n'eo bet manket da loan! Na kennebeud da Vari. Er mod all lavaret: eur harr voan a zo atao yah hag al loan a zalho e bromesaou dirag al labour. N'eus nemed ar glujar hag ar had, ne heller ket o doñvaad! Nemedout-te a ve ouspenn? Red eo dit eta en em reizal!

Nebeud goude fest an hoh, pa gouezo ar pignon, e vezo eun dervez bennag fars gwenn da goan. Aze emañ or mod da lavared e vezo eur pred badiziant. Ha, me a laro d'ar gompiri, paeron ha maeronez, evel da vari heh-unan: « Kemerom 'ta eur hartouron rom abalamour deom da jom plomm! » Mez pas muioh, rag ar pez a zo a re a noaz zoken er blijadur-ze. Ma'h evoh re e vezo ront ho potou! An hent neuze a zo striz, rag n'oar ket evid mond eñ ha pa ve gand tiz! Mond a-raog, dond war e giz! A-raog koueza adarre war e argreiz. Mad c'hoaz pa'z eo an hent seh, ha ma 'maoh hoh-unan war an hent!

Med o soñjal e kement-se, paotr, emao o ribotad dour! N'out ket

avañsetoh. Ha koll a rez da amzer. Sell! An dud o-deus lavaret em-oa greet ar harrad lann da Ber, va breur hena, abalamour ma oan dimezet en e raog, setu eta a-raog va zro. Evid doare n'eo ket brao-kenañ an dra-ze! Ba! Mez bremañ, perag ne rafen ket evitañ ar bazvalan? Gwir eo ne ouezoh ket. Lakom ez eo eun ujenner, ar hannadur kaset en a-raog evid tintal eur ger d'an hini vras a glaskit. Ha lod euz ar vazvalaned, ne hedont ket ma ve goulnennet ganto a-wechou, evid en em lakaad d'al labour... An dra-mañ en-deus goulskoude troet mad meur a dro.

Setu aze ar merk euz ar pez o tigas oa da gaoud ganeoh eur vazvalan. Komz a reeh evel just a beb tra, ha zoken pell amzer, nemed rziouz ar pez ho tigas e gwirionez. Mez aze ho-poa tintet. Greet e oa deoh entent, dre eur mousc'hoarz kaer, pe zoken dre huanadenn gand eur berad daelou e korn al lagad. Surprenet ho-poa luchadenn an tad d'ar vamm, pe d'ar verh. Hag e tigasit kement-se d'ho kaser. Eñ a ouie neuze ma oa leh da gendalher an abadenn « endro d'ar hastell ».

Anavezet am-eus euz an dud-ze, 'vel just, hag en em gemere, gwelit, evid eur „ Hissinger “! Lavarom eur hannad extra. Debron en-doa e-keid ma n'e-noa ket komzet ganeoh, e-ser lakaom o c'hwenad euz ar gaoz a bouez braz-se! Ha zoken, ha dreist-oll euz e ouiziegez e kement-se. An dra-ze gand marteze, gand ma devije... lavared e reer... ha me 'mije laret, pe hreet!

Mad. Soñjom eta da ober ar baz-valan. Pa ziver korn an ejenn eo hada ar winizenn. Me gred eo ar poent. Arabad eo dezañ gedal re, pe e vezo va breur paotr-yaouank-koz. Eun amzer a zo da beb tra. Gwir eo. Arabad eo ober evelon ha Mari. Petra fell deoh, greet on-doa labour a-vañs! Goude eo bet red hasta eun tammig evid dimezi. Hag ar Person n'oa ket luch... Lavaret en-doa deom: « Ne helloh ket felloud kaoud ar hleier...! » Mez evel-se on labour avañs n'en-deus ket greet d'an diwez eur bastard. Lavared a reer ivez: ar gwiziz a ziwan er fank, mez an heiz war ar bank! Mad eo douetuz evel-se.

Mez me zoñj goulskoude, evid an hini a zo lent, kropet, bontonet fall, e raio kalz sikour eur bazvalan. Mond a ran da ober kaoz da Ber, oh ober hano euz Katou, pe c'hoaz Soazig... Hag e larin dezañ: « Kalon ar wreg a zo eun delenn hag a zon ken kaer pa gar he den! » Ha goude ivez e vezo red trei nao gwech an teod a-raog komz sklièr d'an eil pe d'eben euz ar merhed yaouank-se. *Ar plah skañv-benn ha rederez ne vo biken mad da ober tiegez. Mez te, te a vezo gwreg a labour en da di ha ne vo ket morse kalz kaoz ahanout. Ma ra jestrou hag orbidou dirag ar menoz a ginnigan dezi, me laro : « Eur goz votez bet er vouillenn dre gaoud madou a gav perhenn! »*

Goulskoude peb tra n'emañ ket aze, nag en arhant. An arhant a zo atao berr e lost. Ne deuer ket a-benn da dapa evid henn delher ganeoh. Ha ken gwir eo ivez: ar madou braz, an enoriou, euz a dud santel a ra diaoulou! Zoken e-touez kerent beleien! Pebez taolenn gweled sikan evid kaoud eun dra bennag, war e lerh, n'eo ket hepken e kegin ar pres-bital, mez zoken er zakretiri a-wechou. Evel-se madou beleien ha bleo ki, da betra e talvezont-i?

Hogen n'eo ket ken sod-ze lavared d'ar vugale: « Gwella madou a vo atao oberou mad o zadou hag o mammou.» An dra-ze a jom ganeoh kalz muioh eged peb tra all. Aliez goude ar rastell e teu ar forh. Mar deus ar rummad hirio labourer gand ar rastell ha dastumet a-dro ar vreh, gwall-aliez ar rummad war-lerh a zispak hag a goli ar madou dastumet gand ar forh. Goulskoude, red eo gouzoud *ren e garr* ha lakaad an tiegez da roull, sevel diouz e wele d'ober al labour e poent hag en amzer, mond da gousked zoken, ha c'hoaz kalz traou all. *Rag keuneud gleb ha teil loued a gas an ozah gand e diad da glask e voued!* Ar heuneud gleb ne dalv netra da domma. An teil seh, tamm ebed muioh evid trempa an douarou. Ha goulskoude eul lavar koz all a laka da dalvezoud an esperniou bihan lakeet penn-ha-penn: *Gand spillou hepken e heller paea koumanant kant skoed, ma vez a-walh anezo!*

Taol evez evelato! Per an hini a zoñjez a gred *beza euz ar henta troh!* Euz renk ar re o-deus eun dra bennag, pe a gred ez int eun dra bennag. Bez' eo eun tammig ha zoken kalzig lorchuz, pe c'hoaz breminig. Ma lavar din: « N'eo ket gwall-skiantuz an hini a ro ali pe guzul da zimezi,» me lavaro dezañ: « Gwasa zo da zivoaza eo an intañv hag an intañvez! Hag ivez distrei ar moh bet war ar panez! Ne welez ket penaoz en em gemer evid plijoud da eur plah, pe dreist-oll evid kaoud asant ken talvouduz all he herent? Sell mad! Dreist moue ar gazeg eo, paotr, kaoud an ebeulez! Er mod all, na dizoñj ket kennebeud, da genta da ober eun disterra al lez d'ar vamm! Pe zoken d'an tad!»

Kement-se a dalv an taol. Lavared a reer c'hoaz: « *Da wreg fur ha pa ve divalo, e vo 'tao ar gaerra gwreg a zo er vro!*» Gand an hini a laran dit, e-pezo ouspenn *soubenn an tri zraig: dour, holen ha baraig.* Ar peb n'eo e gwirionez, nemed striz an dra a zo red. Evel ivez, kalz muioh eged beva gand dour sklêr hag êr an amzer. Selaou: « *ar zah goullou ne jom ket pell en e zav!* Red eo debri evel an oll evid kaoud doare vad. « *An hini ne zebr nemed avalou poaz, biskoaz bruzun askom ne gahas!*» An dra-mañ a zo sklêr d'an oll. Evel ivez: « *an tamm hag al lomm a zalh an den en e blomm!*» Setu debri hag eva mad o-deus o zalvoudegez.

A-hend-all avad, mad eo teuler evez e pe leh sevel ho tiegez. Ar re a vevo gantañ her graio pe her freuzo. *El leh ma'z eus diou vaouez e vez*

marhad. Mez el leh ma vez teir e vez foar! Ha kement-mañ n'eo ket dalhet a-gostez evid ar merhed hepken. *Ne vezin ket penn-moh ganez!* Da lavared eo, ne rin ket dit fazia. Gand honnez e *vezi terruploh eged bouh Kernaou!* Ober a ri avi. Ha kaoz a vezo ahanout, evel euz da stad. *Mez diwall na strinkfe an trebez war-lerh ar billig!* Diroll a ra, ha mond e kounnar buan a-walh. Evel-se eo, hag *ar had a zo da neb he fak.* Ha nann da neb a jom da zelled!

Pa lavarfen *gevier kement ha trêz en aod,* e hellez am hredi. N'eus ket *brasoh gaouiad eged an tenner dent!* Ha *n'eus ket e neb leh gwall votez na gavje he farez.* Neuze! Perag ne ve ket ket? Gwel, etrezom, *kaoud eul lez-vamm duduiz na vez ket diêz ma vez kristen an oll gwra-gez.* Ar peb zo sur, *ma kustumit da ober ho tañvad, e viot touzet!* Hañ ya! Red eo soñjal en dra-ze ivez pa hoantaer dimezi.

Mez chom dizimez n'eo ket eun abeg talvouduz. *Bez' ho-pezo riou da gahad tachou!* N'eus forz dre be hent ez i er vuhez gand ma vezi leal. Mez a beb gwech ma ranker en em zivenn, *gwelloh eo beza kiger eged leue!* Ha *lez 'ta Pariz e leh m'emañ.* Na zalh ket a gont a gement-se evid ren da vuhez. Zoken, pep hini en-deus ar gwir da ober evel ma kav mad: *Kant bro, kant giz! Kant parrez, kant iliz! Kant maouez, kant hiviz! Nemed unan a ve heb hiviz!*

Ha pa ve! *Peb loudourenn a gav mad he heusteuenn.* E gwir: *etre net ha loudour, n'eus bet atao nemed eur banne dour.* Perag 'ta ober da figuz? Da unan e kavez traou da lavared war da goust, ma'z out divorfil: *Sell 'ta ouz da zeuliou hag e weli eo toull da loerou.* Mez kê eün gand da hent er memez tra. N'eus forz petra e-pezo lakaet en da benn, me a jomo *mud evel pesk.* Ne inkantin ket an nevezenti.

E feiz, e pe leh eo e kaver ar heleier? *Gand bord ar poullou-kanna, eo en ostaleriou hag er milinou eo e klevet ar heleier.* ha n'eo ket hepken keleier an amzer. Deom 'ta da hemañ!

L. Conq
(da veza kendalhet)

Ar goulennoù e Leurgêr Trelaouenan er bloavezh 1946

Eun dervez bennag a zo e oa deuet eur paotr yaouank d'am haoud hag e lavaras din evel-henn: « Deuet on d'ho kaout, Yves, da houlenn diganeoh ha kontant e vijeh da zond ganen, eun afer am-eus da ober.» Ar paotr yaouank-se a zo e hano Jean-Marie Moal euz a Geroñvel. Setu me a houlenn digantañ peseurt afer en-devoa da ober hag e respontas din: « Eur plah yaouank ha me on-deus en em brometet da ober aliañs asamblez. Setu eo mall ganen goulenñ digand Jean-Mari Moal da beleh or-boa da vond evid ober an afer. Setu e respontas din e oa da vond da di Jean-Louis André deuz a Leurgêr e Trelaouenan, ha me a respontas dezañ dioustu: « O! ya, avad, Jean-Marie, kontant on a galon vad da vond asamblez ganez; me n'on ket kustum da ober aferiou evel-se, mez pa zoñjan ez eom da di eur hamarad din evel ma'z eo Jean-Louis ez oa memez fougenn. Jean-Louis ha me, memez pell a-raog ma'z oa hano deuz an afer-mañ, e forz peleh eh en em gavom da en em weled or-beus bet greet atao sin a gamaradiach, ha zoken memez en em gonta war galz traou euz ar pezh a goñsern or micher; bet on e Leurgêr a-raog hirio, mez gweled a ran amañ ez eus tud hag a labour evel e Keroñvel, an tiegezh a zo eur blijadur da weled, traou nevez a zo greet hag urz e peb leh endro d'an tiegezh, ha sur on er parkeier ez eus uzr ivez. Ar Leurgêr a zo renomet a-bell 'zo evid beza eun tiegezh kaer karget a anevaled mad, toud an dra-ze a ziskouez ez eus tud hag o-deus gout evid o micher hag evid ar vuhez.

Goulenñ am-oa greet digand Jean-Marie ha pe hano he-deus ar plah yaouank he-deus en em brometet dezañ, hag e lavaras din eo he hano Maria. A! Maria, felisita a ran ahanout, ar brud az-peus da veza eur plah yaouank fur hag eur gristenez vad e-giz toud ar vugale amañ, hag ouspenn c'hoaz eul labourerez, ar pezh a blijjo kalz da Jeann-Yvonne e vamm da Jean-Marie ha da doud ar familh. Felisita a ran ahanout c'hoaz Maria André da veza choa-

zet eur paotr yaouank fur, eur hristen mad, ar pezh a zo rouez hirio, beza ez eo ouspenn eur labourer dispar; me a oar koulz ha forz piou en-deus Jean-Marie Moal eun daouarn hag a oar teuzi e labour e-giz e dad, Doue d'e bardono. Eur plah yaouank hag a hell kregi e daouarn tud evel-se da bried a hell beza dizoursi o vale war hent ar vuhez. Me n'em-eus ket bet kalz a entretieñ gand he mamm da Varia André, mez gouzoud a ran eur vamm hag a zao bugale vad a zo sur eur vamm a urz vad.

Bremañ ez an da houlenn diganeoh, Jean-Louis André ha neuze Anna Creignou, pried da Jean-Louis, ha kontant e vijeh e rafe aliañs ho merh Maria gand Jean-Marie Moal deuz a Geroñvel?

Bremañ eh en em adresan deoh-c'hwi, Laurañs André an Tad-koz, ha kontant e vijeh e rafe aliañs ho merh-vihan Maria gand Jean-Marie Moal deuz a Geroñvel?

Bremañ e houlennan digand he breudeur ha c'hoarezed da Varia ha kontant e vijeh e timezfe ho c'hoar Maria da Jean-Marie Moal euz a Geroñvel... C'hwi Laurañs a anavezan ahanoh eur pennadig zo, n'em-eus ket ezomm da veuli ahanoh, hoh amzer paseet a ra deoh meuleudi, istim hoh-eus bet endro deoh e-doug hoh amzer dre ho skweriou hag ho kouiziegezh war ho micher, eur familh vad hoh-eus savet, me ne anavezan ket anezo toud, mez anaoud mad a ran eur verh-vihan deoh hag a zo deuet da jom da Daole hag am-eus eviti ar brasa istim ha memez gand oll parrezioniz Taole. Bewech ma en em gav ganen e vez atao eur gontadenn hag atao laouen-braz. Louise eo he hano, diskouez a ra skweriou mad endro dezi.

En em gaoud a ran gand Jeanne-Yvonne, e vamm da Jean-Marie, ha kontant e vijeh e rafe aliañs Jean-Marie gand Maria André deuz a Leurgêr? Ha c'hwi, breudeur ha c'hoarezed da Jean-Marie, ha kontant e vijeh e timezfe Maria André da Jean-Marie ho preur ha da zond da verh-kaer da Geroñvel?

Amañ siwaz e vank daou zen kaer en on touez, ha sur on, toud an dud a zo amañ o-devije bet an dezir o weled an daou zen-ze asamblez ganeom, o kemered perz er banket kaer-mañ, e dad da Jean-Marie, Saig ar Moal hag am-eus anavezet kement koulz ha ganeom toud, evid beza eun den kaer, ar skweriou mad en-deus roet d'e vugale ha d'e gerent, koulz ha d'e amezeien, koulz d'e

gamaraded, koulz dre ar vro a-bez, ma'z eo bet admiret gand an oll. Ar beorien e Kastell, ma rafent o dever, a jomfe da zougen kañv da Saig a Geroñvel e-pad meur a vloavez en eur lavared: „ Ni, peorien, ne ankounac'haom james Saig Moal en or peder-neou evid an aluzennoù en-deus greet deom, atao e vije prest da renta servij da gement hini a vije ezomm, hag e peb giz.“ Ouspenn eo bet eur hristen euz ar re gaerra hag eur labourer euz ar pez ne weler ket endro deom, ma'z eo bet eur holl braz evidom hag evid ar vro an diouer dioutañ. Asistet em-eus anezañ war e euriou diweza, eno eo bet adarre eur skwer evidom; lavared a ree deom: « enoriou a vez greet din, soufr a ran, mez mervel a ran kontant, greet em-eus va dever, va bugale en em garit etrezoh ha karit ho mamm.»

Amañ adarre ez eo glaharuz evid eur vamm hag a gar kement he bugale evel ma ra Jeanne-Yvonne, eur maleur braz a zo en em gavet n'eus ket pell c'hoaz gand François he mab hag en-deus skoet anezañ d'ar maro. Ar paotr yaouank-se a zo bet adarre eur skwer vad evid an dud yaouank, e peb giz, chentil, prest atao da zenti ouz e dud hag e vamm, eur paotr yaouank a feiz, evel zo rouez, karet hag istimet gand e gamaraded, eur labourer dispar e-giz toud ar vugale e Keroñvel, oll dud ar harter a garie anezañ, evito eo bet eur skwer ken kaer. Asista or-beus greet war e fin diweza ha gwelet or-beus pegen kourachuz eo ar hristen mad war e fin diweza. Poaniuz eo c'hoaz ouspenn ez oa en em brometet da eur plah yaouank fur hag eur plah vad hag euz eur familh euz ar re wella. En em areti a rankan, kar gouzoud a ran ez eo glaharuz da eur vamm vad evel m'eo Jeanne-Yvonne gweled eur hrouadur ken karet ganti o tisparisa e-kreiz fleur e yaouankiz. Echui a ran en eur lavared da Varia e hell beza dienkreuz o vond da Geroñvel da verh-kaer. E Leurgêr he-deus eur vamm vad, mez e Keroñvel he-dezo eur vamm adarre hag a vezo mad eviti e peb giz. Gand tud chentil ha tud vad e vez kontantamant e peb leh.

Reketi a ran deoh, Jean-Marie ha Maria, chañs ha boneur en ho menaj, prosperite e-giz ho-peus gwelet e ti ho tud, c'hwï a gendalho da vond dre o roudou.

Yves ar Bian.
Bet roet gand **Naig Rozmor.**

Ar pennad-mañ a zo bet savet er bloavez 1946 gand **Yves ar Bian** euz tiegez brudet Kerollah e parrez Taole. Va faeron e oa.

Notennoù:

Ar goulennou: evel-se e veze anvet ar gouel-ze. **Ar goulennou** dre ma vezent greet ouz kement den an ti ha zoken ouz an dud nevezig eet d'an anaon euz ar familh. An oll a veze bodet evid eur pred braz hag oll e vezent goulennetaet, euz ar re vihan beteg ar re goz ha zoken ar re nevezig maro. Saik ar Moal a zo marvet e 1945, e vab François a zo bet lahet gand e varh e 1946, hag e welit ez eus ano anezo er goulennou-mañ.

Gwechall e veze klevet lavared: « Disul em a ar Goulennou el leh-mañ-leh. War-lerh pred ar Goulennou eo e veze roet he gwalenn a bromesaou d'ar plah yaouank.

Ar Goulennou a veze greet gand eun den, kar pe mignon da familh ar paotr yaouank. Ar goulennou a vez greet atao e ti ar plah yaouank, dezi ha d'he familh.

War-lerh ar goulennou a zelle outañ, pep hini a responte: « Ya, kontant on ». Anad eo ne deue ket eur plah yaouank da verh-kaer en eun ti heb asant oll dud an tiegez.

Goude ar Goulennou-mañ, e oa bet servijet ar pred er hreñch vraz, stignet gand liñseriou gwenn ha bleuniou; ouspenn hanter-kant a dud a oa bet.

Emile Ernault

L'ancien vers breton

Eul leor na oa ket ken anezañ:
50 skwerenn nevez bet adkavet!

Priz- 20 lur (80g).

Kañv war ar han-ha-diskan

Daou viz a zo, d'ar 27 a viz kerzu, eo bet interes e Travrin he bro henidig, ar gosa euz ar c'hoarezed **Goadeg: Maivon**, « Tannon » evel ma ree he mignoned outi.

Ar wech kenta m'eo bet klevet he mouez gand Breiz-Izeliz a-bez a oa da geñver abadenn Radio-Kimerh e miz even 1963 (eio dija en tu-hont d'he zri-ugent vloaz). Bez' e heller lavared e kouezas dindan gazel-gê kement hini oa o selaou, ar zulvez-se. Anavezet oa dija, se zo sklêr, Tannon hag he c'hoarezed **Eujeni** hag **Anastazi** en o horn-bro, tro-dro da Garaez; hogen diwar neuze en em ledas o brud dre-oll hag e talhas da greski e peb leh e Breiz. Kement zoken ha ma teuas Stivell – tapet gantañ ivez eun tamm brao a vrud – ar zoñj dezañ d'o has da Bariz, eun deg vloaz bennag a zo. Eun dudi e oe, douetañs ebed, evid Bretoned Pariz gweled a-dost an teir c'hoar e koef, gwisket kran gand o dillajou giz Karaez o kana dirazo toniou kaerra Kerne-Uhel. Daoust avad – en amzivin emañ abaoe – ha pignad war leurenn an **Olympia** hag hini **Bobino** n'eo ket bet eur boan kentoh eged eur seiz-plijadur evid Tannon hag he c'hoarezed? Eur binijenn gouzañvet ganto evid o breudeur harluet?

Ar skeudenn ziweza on-eus bet euz Tannon eo an hini bet diskouezet war T.F.1 gand Michel Tréguer e-doug e abadenn **Saga** d'al lun 5 a viz kerzu, pemzegteiz nemedken a-raog ma'z eas-hi da anaon. Ar wech diweza eo bet dezi kana **Gousperou ar raned**; ha respont gand daoulagad digor d'ar goulennou greet outi gand eur henvroad yaouank deut ivez, evel Stivell, da veza unan euz he mibien: Donatien Laurent.

Abel Adost.

Mojenn gand Alan STIVELL

Enrollet en eur studio e Boulogne-Billancourt e-doug nevez-amzer 1983, trizegved pladenn **Alan Stivell** a vez kavet da brena er stalioù abaoe eun nebeud miziou dija. Ar pez a jeñch an taol-mañ eo e-neus klasket ober ar muia a draou e-unan e-keñver kan ha sonerez. Savet e-neus eur zonerez a zo tost d'e galon, heb derhel re a gont euz « ar hiz ». Evid piou e-neus greet anezhi? Pas nemedken evid ar re a vourre doh **A l'Olympia** moarvad...

Diou lodenn vraz a gaver enni: sonerez evid film **Monique Enckell** **Si j'avais mille ans** war an tu kenta ha toniou diwar-benn mojennou koz Bro-Iweron war egile.

Konta a ra ar film istor eun enezenn bet kouezet eur malloz warni: implij a ra Stivell daou don euz ar Barzaz-Breiz, **Azenor** ha **Tour an Arvor**, goude beza merket ema gwall dost o homzou ouz an istor bet ijinet gand ar realizatourez Enckell. Siwaz n'on-eus ket bet tu da weled ar film-ze c'hoaz; n'eus ket bet kavet den ebed da zistribui anezañ.

Evid sevel an eil tu eo bet awenet gand mojennou koz Bro-Iweron hag a gont penaoz eo bet aloubet an Enez Hlaz dre beder gwech a-raog eo deuet ar Gelted da jom enni; ar bobl ziweza araozo, an **Tuatha de**

Danann a vez kontet o doare amañ: istoriou karantez hag emgannou kriz dreist-oll, diéz da intent evidom, tud euz an ugentved kantved; dizoh a reont dre eur seurt emgleo: mond a ra an « Tuatha de Danann » da jom dindan an douar e-keid ha ma chom ar Ouezeled war-horre. Soñjal a ra da Alan Stivell ez eus eul liamm etre ar mojennou gouezeleg ha skiant-faltazi an deiz a hirio: klask a ra henn diskouez dre e zonerez.

Adkaoud a reer levezon meur a hini euz e bladennou all: hini **Reflets** er ganaouenn genta **Tour Azenor**; hini **Renaissance de la Harpe Celtique** ivez: eur plas a-zaore e-neus roet d'an delenn: en eun nebeud solojou dreist-oll e hellom tañva ar zon sklin-tin n'eus ket e bar da denna diouti; hini ar **Zinfonienn Geltieg** a-wechou, ken digor hag hi war ar béd a-béz eo, mez pas ken meurdezuz, hini **Béd an dud veo**, med n'eo ket kement « diouz ar hiz ».

Ha koulskoude pa zelaouer anezhi, e ouezer ervad n'eo ket eur bladenn goz. Perag eta?

Peogwir eo deuet a-benn da liamma dre e vuzik menoziou koz-Noe tennet euz mojennou pe barzonegou (Imram Brain) e gouezeleg ar Grenn-Amzer, pe zoken euz an amzer-da

zond, a zoñj dezañ d'an nebeuta. Kana a ra brao, evel eur manah, tam-mou heñvel eun tammig euz ar han-plén, med implij a ra ivez ar siñteti-zer a-leiz ha taboulinou a beb seurt en eur stumm modern-tre.

Peogwir ivez e seblant beza deuet da veza mestr war an teknikou d'en-rolla en eur studio: kana ha son a ra e-unan koulz lavared an oll doniou: ha deuet eo a-benn euz e daol: n'eus ket an disterra tra da rebech dezañ.

En oll, eur bladenn gaer, eur zone-rez fromuz savet gand eun den gwri-

ziennet kreñv, med n'e-neus ket e-zomm d'henn lavared a-bouez-penn ken. Med daoust hag e teuo a-benn da zacha evez kement a dud ha deg pe zaouzeg vloaz a zo gand e **Bop-plin** da skwer, n'eo ket sur tamm e-bed, ablamour d'an eil tu dreist-oll, hag a zo diêsoh da heulia memestra. N'eus forz penaoz, n'eo ket ar pez e-neus fellet d'Alan Stivell ober e **Mojenn**.

J. Goyat.

Embannet eo **Mojenn** gand ar merk **A2**.

Yves Miossec

Lorh, kasoni ha poan

Al levr zo eur romant.

Konta ra ar pez a hoarvez gand diou famill diwar-ar-mêz e Bro-Leon, e-pad amzer griz ar brezelioù etre ar Gatoliked hag ar Brotestanted, da fin ar c'hwezegved kantved, pa ne oa urz ebed ken nag e Bro-Hall nag e Breiz.

An diou famill a en em glev mad. Med eun tól-lorh hag, evid nebeud a dra, e sav etrezo kas ha trouz hag a zigas ganto freuz, laherez ha poan.

Skeudennou gand Joel-Jim Sevellec

Eul leor 264 b., 40 lur.

Ar ger « Karr-nij » krouet dirazon.

Ne hoarvez ket gand an oll gweled ha klevet kroui eur gér nevez. Mad, n'eus forz pegen souezuz eo, em-eus, me, gwelet ha klevet kroui, gand eur vaouez hag a ne ouie na lenn na skriva.

Pell 'zo abaoe, peogwir ez eus deg vloaz ha tri-ugent, just er bloaz a-rôg ar brezel braz kenta. Med ar pez am-oa gwelet ha klevet a zo chomet beo em daoulagad hag em diskouarn.

C'hoarvezet e oa da viz mae 1913, d'ar poent ma vezed neuze war ar mêz o hwennad ar beterabez yaouank. Soñj mad em-eus toud. Goude lein e oa, abred goude lein. An amzer a oa kaer-meurbed. An heol, uhel war an oabl glaz-gwenn heb eur goumou-lenn, a dôle eur sklêrijenn skeduz war yeot druz ar hrizennou, war fleur alaouret lann ar hleuzioù, war zouar rouz ar park e oam ennañ hag a veze greet outañ « park Poull-ar-Zarp », war zeliou, ken bihan tost ha diskouarn logod, ar plant beterabez stank en o renkadou.

Tomm e oa. Va mamm-goz, va zad ha va mamm a oa e-kreiz ar park war o farlochoù o hwennad, eur zah ganto e-giz tavañjer evid mired ouz o dillad da veza stlabezet. Mond a reent, skoaz-ouz-skoaz koulz lavared, pep hini etre diou renkad beterabez, ar hwenneraz en o dorn dehou, en eur skraba an douar dirazo etre diou renkad hag etre diou renkad all, a beb tu. Ar c'hwennad kenta e oa ha ne reent nemed tenna al louzou. Ar plant beterabez a oa c'hoaz re vihan evid beza rouesët.

Eun tól c'hwennerz a zigore heb poan krohenn tano an douar bet labouret teir pe beder zizun a-rôg nemedken, a drohe en tumañ eun toullad louzou tener, nevez diwanet, a zache ganti en tu all eun tamm treuz-yeot druz kasauz, eet dija don en douar o gwriziou gwenn kaled, hir evel lasou moan, prest o beg da glask mond war-rôg.

Eul labour luguduz ha skuizuz! Med unan hag a ne veze ket inouüz, rag, dre ma'z eed, e helled konta kôziou kement ha ma kared. Ar hwennerz a yee atao ken buan hag an teod.

Ni, ar vugale, me, c'hweh vloaz, va breur, pemp, va c'hoar, tri, a chome da fistoulad tro-war-dro, diarhenn, evel just, rag, pa veze brao an amzer, ne hellem ket derhel en on treid nag on loerou nag on boutou-koad, re eüruz o santoud dindanno tommder plijaduruz an douar flour.

Dond a ree deom a-wechou mond beteg ar hrizenn hag ar hleuz da zelled ouz ar fleur kaer, ouz ar papillonou skañv a beb seurt liou hag ar gwenan a yee euz an eil fleurenn d'eben heb ehan, ouz an amprevaned bihan a-vilierou war ar yeot, ha da hoari gan-to.

Eno, pell diouz an hent braz, e veze eur peoh sikiz. Ne gleved nemed beb an amzer, pe vouez on tad,, on mamm, on mamm-goz o kôzeal etrezo, pe hini eun alhweder o sevel en êr da dôl skiltr e gan laouen war-zu an neñv, pe, a-wechou, hini eur pôtr yaouank o youhal war e gezeg da ober dezo mond buannoh, ha, neuze storlok ha gwigour ahel ha rojou ar harr o vond, etre kleuziou an hent bihan, dre rollehiou don, leun c'hoaz a zour hag a vouillenn ar goañv tremenet.

Med a-greiz-toud e teu beteg ennom, diwar-zu Montroulez, eun drouz hag a n'eo ket ordinal. Biskoaz n'on-oa klevet hini ebed heñvel outi. Eur fraoñvadenn eo, med kreñv iskiz, ken kreñv ha ma'h en em houlennom petra a hell beza oh ober anezi. Eun hed-gwenan, pa vez o kuitaad e gestenn (klevet on-eus meur a hini), a fraoñv kreñv, med morse kement-se. Chom a reom da zelaou. Euz a uhel e lavarfed e tiskenn. « Petra e hell beza an dra-ze? » a en em houlennom, ni ar vugale, en eur dostaad ouz on tad hag on mamm, kroget aon ennom.

On mamm hag on mamm-goz a zo ken neheta ha ni. —« Petra 'ta, Jañ-Mar, eo ar fraoñvadenn-ze? » a houlenn on mamm digand on tad. Eñ a zelaou eveldom, med en eur glask gweled eun dra ben-nag en êr. A-greiz-toud e lavar: —« Sellit mad 'ta. A-hont emañ a-zioh beg tour Tôle! Ne welit ket anezañ? Da weled n'eo nemed eur pik du. Hennez a zo eun aeroplan. »

On tad, nao pe zeg vloaz a oa, e-noa greet tri bloaz servich pell du-ze e sav-heol Bro-Hall, e Chalons-sur-Saône, a gav din. Eno e-noa klevet meur a wech ano euz an « aeroplan ». Med n'e-noa ket bet tro da weled hini ebed. Dalhet e-noa soñj mad euz ar pez e-noa klevet. —« O! emezañ, marteze eun tamm lorch ennañ o tiskouez e oar meur a dra nevez, eun aeroplan eo ha netra ken, » hag e kendalh da zelled ouz ar pik du. Esa a ra ivez on lakaad d'e weled eveltañ. Eur pennad brao e rankom klask, ni, a-rôg e gavoud. Med pa welom anezañ ez om laouen, on mamm-goz, on mamm ha ni, ar vugale. Kercent an aon a oa en em zilet ennom a ya kuit euz on halon. Hag oll, braz ha bihan, e chomom da zelled outañ o vond goustadig (da weled da vihanna) war-zu Kastell-Pôl.

Med neuze a-greiz-toud e klevom eur vouez o hervel ahanom kreñv, hini eur vaouez spontet, anad eo, a-dreg on hein. —« Jañ-Mar ha Perrin, a lavar-hi, sellit 'ta a-hont, uhel en êr, a-zioh Henvig, eur harr-nij! Pebez tra spontuz! Da biou eo hennez? D'an diaoul? » Hag e kendalh da lavared: —« Eur harr-nij! Eur harr-nij! » Distrei a reom da zelled ouz ar vaouez. Soaz an ti all eo. Med mantruz eo he gweled en he zao war ar hleuz, he daoulagad dispourbellet gand ar spont hag an herrder, he breh astennet ganti dirazi war-zu ar harr-nij. Ne baouez ket da youhal: —« Sellit 'ta, eur harr-nij! Sellit 'ta, eur harr-nij! » Ni, neuze ne hellom ket distaga on daoulagad diouti. En em zistaga a ra net en he dillad du war an oabl glaz hag er sklérjenn skeduz. Du eo nemed he bizaj euz an neh beteg an traoñ: he hoef a Dôleadez (euz Tôle ez eo deuet da verh-kaer d'an tiegez a zo e-kichenn on hini) a zo du; ober a ra dezi daou gorn war he fenn. Du eo he mouchoer war he diskoaz. Du eo he zavañjer. Du eo he lostenn, he loerou hag he boutou.

On tad a lavar dezi: —« Alo 'ta! Soaz, arabad dit kaoud aon Rêzon e-peus. Eur harr-nij eo ha ne raio droug da zen ebed, na dit-te na deom-ni. Me am-eus klevet ano outañ pell 'zo. Bez' ez eus zoken eun toullad brao anezo dija endro da Bariz. Distrei a

hellez d'al labour heb aon ebed.» —« Ya! Jañ-Mar, a respont-hi. Kredi a ran ahanout. Med eun dra iskit eo memestra, ne gav ket dit? Eur harr-nij evel-se hag a ra kement a drouz! Mantruz eo.»

Ar harr-nij ne vez ket gwelet ken. Ne vez ket klevet zoken e frañvadenn. Soaz a zistro d'he fark da hwennad ar heterabez gand he gwaz, he zad hag he mamm, ken pennfollet c'hoaz ha ma oa bet hi bremañ. Hi, eur vaouez eun tammig berr he spered hag a ne ouie na lenn na skriva he-doa kavet en eun töl ar ger brezoneg ar gwella da envel an dra nevez a veze greet outañ e galleg d'ar poent-ze eun « aéroplane ».

Sur eo n'eo ket ar paour-kêz Soaz eo he-doa lakët he-unan ar ger da en em skigna dre ar vro. Med e gavet he-doa, outi he-unan, heb sikour den desket ebed. Hag ar ger ganet evel-se dirazon a zo chomet merket don em spered abaoe. Med an istor n'eo ket echu.

Pemzeg vloaz bennag goude e tlee kaoud evidon eun tamm brao a dalvoudegez. E Skol-Veur Poitiers e oan o paseal egzamin diweza al lisañs, an hini a veze greet outañ e galleg « Grammaire et Philologie », yezadur ha lizeregouriez. Resevet e oan bet el lodenn genta, an hini a veze greet dre skriva, hag en eil, an hini dre gomz, an egzaminour a houlennas diganen: —« Daoust ha gouest e vefeh da ziskouez din ha gwir eo ar pezh a lavar lod euz geriou eur yez? Ar geriou, emezo, o-deus eur vuhez heñvel ouz hini an dud a implij anezo. O gweled a reer o kemeded buhez, an implij a reer outo o kreski tamm-ha-tamm, ha goude e kollont o nerz, ez eont da netra, e varvont.» —« Ya, ôtrou, gwir eo, a respontan dezañ. Med, mar plij deoh, ez an, e-leh diskouez an dra-ze deoh, da gonta deoh penôz, pa oan bihan, em-oa gwelet, me, kroui eur ger brezoneg, e lakaad da zond er béd, hag ar pezh a oa ar gwella, gwelet anezañ krouet gand eur vaouez heb deskadurez ebed, eur ger hag a vez greet bremañ implij a-leiz outañ.» —« Ya, sur a respont-eñ. Kontit 'ta an dra-ze din.»

Hag e kontan dezañ penôz em-oa gwelet o kemeded buhez, eun devez euz miz mae 1913, pa n'em-oa c'hoaz nemed c'hweh vloaz, ar ger nevez « karr-nij ». Ne gredoh ket ahanon marteze pa lavarinn deoh an notenn a lakaas din an egzaminour pa 'm-oa echu. Ugent war ugent! Biskoaz n'em-ije soñjet kaoud kement.

« Karr-nij » Soaz an « Dôleadez » e-noa douget ahanon ha kaset ahanon buan ha brao da echui va lisañs.

Yves Miossec.

Kristian Brisson

Ar Reder-mor

Priz Per Roy 1983

L'on a très rarement l'occasion de lire un bon roman en breton. Cela arrive, heureusement, mais c'est toujours un événement. Eh bien, je considère comme une événement la publication du roman de Kristian Brisson « Ar Reder-Mor ». Un roman modeste par la taille, mais important par l'inspiration...

Une inspiration typiquement bretonne... Une oeuvre qui honore la langue bretonne... Un écrivain de talent...

Yann Brekilien - Breizh .

Priz: 20 lur (150g)

Kemennou

Sarmoniou brezoneg enrollet

A-berz **Mikael Madeg**:

Lohet em-eus nevez 'zo, e diabarz ar gevredigez **Dastum**, eur sonskrifaoueg vreizeg, **Komz** he ano. Da zond er-mêz eo dizale an niverenn genta, enni eun eur-vez kaoz diwar-benn an Ankou. Istoriou sinadou ha seblantou sonskrivet gand eun tregont bennag a dud ken e Kerne ken e Leon.

Tost prest eo an eil niverenn e leh vo kavet en he hed eur vojenn a-goz sonskrivet e bro-Garaz (**Margodig an Dour yen**) a ya d'ober eun eurvez.

Evid an teirved niverenn em-eus soñjet e vefe mad kinnig d'an dud eun dibab a sarmoniou brezoneg. Ar re-mañ a hellfe beza daou seurt tud instereset ganto: ar Gristenien, hag an dud all troet gand ar zevenadur pobl. Rag eur gwir lennegezh pobl dre gomz edo ar sarmoniou gwella.

Evel evid an niverennou all e vefe embannet war eun dro eur hasedig tro eun eurvez selaou, hag an testennoù skrivet en o hed da heul.

Setu emañ war glask sarmoniou brezoneg a vefe bet sonskrivet gand tud instereset gand ar relijionou o-deus implijet or yez. Red e vefe dezo beza sonskrivet frêz, da zoñjal bez adsonskrivet.

Red e vefe din ivez klask rei eun tañva euz sarmoniou war veur a zanvez, e tro pemp pe c'hweh anezo etre toud. Ha ma vefe kavet eur sarmon protestant ivez ne vefe ket falloh. Gwelloc ivez lakaad da vihanna peb a sarmon o tond euz ar pevar eskopti koz.

Evidon-me n'em-eus ken unan e-touez va bandennoù-me, sed ma ne gavan ket tud all d'am zikour, ha tra-walh a sarmoniou da helled choaz, ez aio ar menoz d'ar zah.

Eul labour e doujañs menozioù an dud o-doa distaget ar sarmoniou e vo evel-just. Ha digand eur beleg an hini e vo goulennet skriva ar pennad digeri.

Ma anavezit tud all a hellfe kaoud sarmoniou evel-se, dreist oll beza sonskrivet overennoù brezoneg, koz pe nevez, en o hed, kasit kelou din. Eun oberenn war hir dermen eo, med dindan bloaz e klaskin he has da benn memestra.

Skiant-prenet an desevel bugale e brezoneg en eun endro yez kontrol

Nevez adkroget on da labourad a-zevri war an danvez-mañ em-oa pleustret dija eur poent 'zo bet: gweled e niv. I ar gazetenn **Plandenn** (diskar-amzer 79).

Gwelet em-eus dija eun 40 famil bennag, dreist-oll e Bro-Leon, e leh ma'z eus bet klasket sevel ar vugale e brezoneg gand unan euz ar gerent da vihanna. Kouz e leh int deuet a-benn ha leh int chomet sac'het. A-bouez eo an daou seurt end-eun.

Va fal eo ober eun enklask resiz a-walh gand eun tregont famil bennag, dezo stuzioù ha doareoù disheñvel-mad. Ha sevel eun dosier e brezoneg, diazez eul leor bruderez e galleg, leh ma vefe kinniget d'ar Vretoned dre vraz klask ar muia posubl ober gand ar brezoneg er gêr da genta. A-bouez braz eo rei d'an dud a hellfe beza instereset skiant-prenet, kouz negativ ha pozitiv, ar re o-deus klasket ober dija.

Savet em-eus eur goulnadeg resiz a-walh (2 follennad hanter a houlennoù diwar-benn ar famil, ha pemp diwar-benn peb bugel deuet d'an oad den). Ma vefe kontant d'am zikour ha dre ze emichañs da greski niver an dud a glasko kaozeal brezoneg d'o bugale er gêr, e hellfeh:

- asanti e teufen d'ho kweled eun devez bennag, pe e kasfen eur hamalad din d'ho kweled.
- pe leunia hoh-unan war ho tranilite eur rumm goulennoù hag o has din endro.

Er hontrou diouz ar pezh em-oa greet an taol kenta ne vo meneget ano den ebed, ha teorikaet e vo an traou. Gwelit penn kenta unan euz ar renta-kontou a zo savet dija hag a zo kaset deoh da heul.

Eur wech skrivet ganin peb renta kont e vez kaset d'ar famil dezo da rei o aotre pe da cheñch ar pezh a gavont a vefe da cheñch. (e fin miz kerzu em-oa gwelet 40 famil).

Fotoioù o tiskouez an diouyezegezh ofisiel e broioù 'zo

Lohet on da brienti asamblez gand va skoldi war ar brezoneg e lise Kastellin eun dosier e leh ma vo kinniget da barrezioù ar vro a dro-war-dro ofisielaad implij skrivet ar brezoneg.

Emichañs ne vefe tamm ebed falloh, kentoh eged na chomfe on zammig labour en eur horn a Vreiz hepken, klask ledannaad ha sistematikaad anezañ.

Da voueta an dosier-mañ, e leh vefe fotoioù, emañ o klask end-eeun fotoioù sklêr-tre hag a hellfe beza prestet deom evid eur pennadig (ha restaolet war-lerc'h).

evel just). Ar fotoiou-mañ da ziskouez: plakennoù diouyezeg pe liezyezeg – panelou hent, anioù lehiou pe burevioù) e broioù all: Bro-Gembre, Iwerzonn, Bro-Skos, Yougozlav...; anioù lehiou, dreist-oll ruiou ha war vureoioù kêr e diabarzh Breizhel e leh ma vefe implijet ar brezoneg hepken, pe gand ar galleg.

Ma anavezit lehiou e leh ma'z eus, ha n'ho-peus ket fotoioù, kasit kelou memes-tra, ni a yafe di d'ober anezo.

Eur studiadenn evel-se a hellfe mond mad-tre goude-ze da veza embannet en eur gazetenn evel **Skol Vreizh** pe unan all.

Evid an tri hemenn-ze, skrivit da v-**Mikael Madeg, Kéredol, St Thonan, 29220 Landerne**.

Keleier ar Vro-Bagan

Nevez bet eo Bodadeg Veur **Ar Vro-Bagan**. Renta-kont euz ar bloavezh bet hag euz ar bloavezh da zond zo bet.

Er bloavezh 83 ez eo bet savet **Kernevez City**, bet c'hoariet tost da ugent gwech beteg-henn. War ar miz ez eo bet c'hoariet hag er hêriou ivez da geñver gouelioù braz (**Erru an Noz** e Roazon, **Festival Kerne** e Kemper...). **Ar Spontaill Circus** ivez a zo bet c'hoariet eur wech bennag, na pa ve ken en Henañsal da geñver **Festival ar Broioù gwasket**. Peziou savet gand skrivagnerien Vreiz a zo bet savet ha c'hoariet ivez: re **Roparz Hemon** (Ar bank oaled, Meurlarjez, Lina, An tan e ti Kernaspreden...), Anduillenn ar Person gand **Youenn Drezen**, peziou **Jarl Priel**... Troet eo bet **An Arz** hag **An droug a ra ar butun** euz **Tchehov** ivez. **Marzin Circus** a zo bet savet ha c'hoariet evid ar vugale e nousped skol ha gouel abaoe bloaz.

Setu bremañ ar pezh a zo war ar stern evid ar bloaz-mañ:

1) Nevez savet ez eus eur pezh evid ar vugale, **Roue ar mor**. Mari, eur plahig vihan troet braz gand an huñvreou, a glev beb noz mouez ar Roue-Mor... Eun nozvez n'he hlev ket mad ken rag dalhet eo gand anevaled ha tud droug e strad ar mor... Evid mond war e zikour, Mari a ranko digeri eul leor braz ha divenna a zo en he zi ha mond da redez a-dreuz eur béd ankeniuz ha spontuz. Diouz a beb seurt dañje-riou ha kudennoù e vo red dezi dond a-benn a-barz kavoud ha digabestra Roue ar Mor... Pe e galleg pe vrezoneg pe galleg-brezoneg e vez c'hoariet dirag bugale ar skolioù-mamm beteg re genta an eil derez. Labourad a heller en a-raog gand ar skolaerien e-keñver ar brezoneg ha c'hoari ar pezh diouz oad ar re a vez o selled.

2) Evid ar re goz hag ar re oajet e vo c'hoariet ivez. En tiez evid an dud en oad hag er strolladoù trede oad e vezo displeget peziou berr, marvailloù ha kanaouennoù. Emaer o skriva eur pezh hag a gonto penaoz an daou goz euz ar **Veaj organizet** a zo en em gavet evid an nozvez kenta en Hotel Teir Steredenn!

3) Beilladennoù a vez greet c'hoaz war ar miz, e Kerlouan, Gwiseni, hag e Kreh-ar-Hamm evel just.

4) **Ar Baganiz** eo a vezo pezh-c'hoari braz **Ar Vro Bagan** er bloaz-mañ. Skrivet eo bet gand **Tangi Malemanche** ha ral ma'z eo bet c'hoariet e brezoneg. Emaom war aochou Bro-Bagan, barr-amzer a zo war ar mor, eul lestr estren a zo deut d'ar garreg e peñse. Karantez a zav etre ar martolod kernevad Lan, savetaet e vuhez gantañ, ha Del, merh Seni Falhan, mestr-braz al leh... Kriz eh echuo an abadenn evid meur a hini. Evid diskouez ar mor dirollet hag an avel follet, al lestr en argot hag an emgann etre peñserien ha peñsead ez eo bet goulennet ouz **Dihun Redon** labourad gand **Ar Vro-Bagan** e-keñver ar horoll.

Da fin miz even e vo c'hoariet **Ar Baganiz** evid ar wech kenta. Red eo lavared ousspenn ez eo bet skoazellet braz ar strollad gand **Skol Uhel ar Vro** evid kas ar pezh-se da benn.

5) C'hweh vloaz zo ez oa bet eur **Festival C'hoariva Brezoneg** war-dro Kastell-Paol, kaset endro gand **Ar Vro-Bagan** hag ar strolladoù all. Soñj en-deus **Ar Vro-Bagan** d'henn ober adarre er bloaz-mañ hag e Plougerne, war dro fin miz even. Dañs ha c'hoariva galleg a vije marteze er gouel-ze.

6) Emgleo a zo bet etre ar strollad ha komun Plougerne. Evel-se ez eus savet eur **skol hoariva** galleg ha brezoneg da zeski d'an dud o-defe c'hoant da hoari pezh. Ar pezh a zo bet savet a vo c'hoariet dirag an dud diwezatah.

7) C'hoaz e vez c'hoariet **Kernevez City** dre ar vro ha beteg dibenn ar bloaz. E Brest, sal Cerdan, e vo c'hoariet d'ar 14 a viz ebrel, pedet da hoari eno gand renerien **Palez an Arzou hag ar Sevenadur**. Sonerez Kernevez City gand sonerien **Ar Vro-Bagan** a zo bet greet eur bladenn vihan ganti lakaet e gwerz. Da houzoud ano, galvit **Maivon Berthou**, Lestevennog, Plouider, 21-10-01.

AR VRO-BAGAN.

Lizerou

« Va adkoumamant evid 1984. Gand va gwella gourhemennou evid ho labour ken pouezuz war dachenn ar yez. »

H.D., Pleraneg.

« Red eo din lared deoh ivez am-eus kavet dedennuz-tre pennadou **Fañch Danno** diarbenn ar zonereh (nn 65 ha 69). Setu perag e vehen laouen-braz pa skrivehe en den-mañ liezikoh e-barh ho kelaouenn **Brud Nevez**. »

H.R., Montgeron.

« Ho pedi a ran d'am digarezi. Al labourerien-douar a zo lezireg da skriva. Daoust d'am oad tri-ugent vloaz, on karget a labour, hag aliez vez red lakaad an noz da astenn an deiz. Plijoud a ra din **Brud Nevez**, gand brezoneg yah deuz Bro-Leon. Kendalhit da stourm evid or yez hag evid Breiz. Nebeud a dud siwaz a zo gouest da skriva e brezoneg evel **Brud Nevez**. Me ho ped d'am digarezi da veza ken lugudur da renevezi va houmanant. »

S.G., Millizag.

« Emaon o paouez reseo an niv. 70. N'em-eus ket bet amzer d'he lenn c'hoaz nemed **Amzer ar goulou du** gand **Naig Rozmor**, am-eus kavet kaer ha fromuz. »

R.D., Ar Hastell-Nevez.

« Eur zizun a-raog kuitaad ar vro-mañ em-eus dizoloet ho kelaouenn dre zigouez. O teski brezoneg emañ, ha plijuz-tre em-eus kavet ar pennadou skrivet gand **Visant Seite**. Kas a ran deoh va houmanant neuze. Bezit ar vadelez da gas ar gelaouenn da va jomleh e Breiz, o veza ma tistroin d'ar vro, evid atao, fiziañs am-eus, 'benn fin miz even. »

V.C. Cleder

« Trugarez evid leor **F. Broudic**. Brao eo, ha boued a zo e-barz. »

J.P., Koadoud.

« D'am meno, 1984 a welo stourm ar Vretoned evid o yez, o zevenadur, o unvaniezh o vond war-raog. Gand ma tevio da wir diouganou ar Varzed a-wechall hag e paro an heol war amzer-da-zond or bro, hag evel-just war hini ar helaouennou brezoneg. »

E.G., Kleder.

« Labour vad, ha marteze digalonekauz a-wechou, a rit evid ar brezoneg, ha felloud a ra din lavared deoh va anaoudegez vad. »

J.A., Sant-Herblain.

« Staget on da lenn leor **Yves Miossec**. Leor plijuz-meurbed. Pa vin emgavet er fin, marteze ez in-me war roudou tud Lamber ha tud Keravel. Mad e vefe din marteze zoken mond di gand Yves Miossec. Petra zoñjit a ze? (...) Leor an Aotrou Miossec a gavan an talvoudusa. »

Y.P., Gwened.

« Goulenn a ran diganeoh kas din **Brud Nevez**. Eur chekenn a gasin deoh kerkent ha ma erruo din an niverenn genta. »

J.C.M., Ploueskad.

« Je renouvelle mon abonnement à **Brud Nevez** que je reçois avec beaucoup de plaisir depuis un an maintenant. »

J.B., Vezin-Le-Coquet.

« Setu amañ eur chekenn a 120 lur evid adkoumananti da **Vrud Nevez** a gavan ken plijuz atao. Ha keid ha m'emaon ganti, kasit din, mar plij, eil moulladenn leor **Mikael Madeg « Lesanoïou Bro-Leon »**. »

F.R., Kastellaodren.

« Echu eo va houmanant. Setu amañ eur chekenn kant lur evid eur houmanant nevez. Buhez vad ha hir da **Vrud Nevez**. »

X., Aix.

« O paouez reseo **Brud Nevez** emañ. N'ouzon ket piou eo **Yann Gouer**. Kenta tra am-eus lennet. Va gwella gourhemennou dezañ. Eun doare dispar e-neus evid konta deom an darvoud nevez-tremenet e Brest.»

P.R., Roazon.

Pevare moulladenn, nevez deut er-mêz:

Dr J. Tricoire

KOMZOM BREZONEG

Première partie

Eul leor euz ar gwella da studia ha da gelenn ar yez

Embannaduriou Emgleo Breiz

Priz: 45 lur (300g)

(Eur vinikasedenn: *K.L.T.*: 20 lur : *Gwenedeg*: 20 lur (120g))

